

Rolland Charles : Lanneanou 1862 – Gwerleskin 1940)

Ar vezventi. Bet embannet e 1901, en brezoneg, gand eur skrid e galleg.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Iskiz-kenañ eo doare-skriva Rolland. Hag ouspenn e vez kemmesket gantañ ar rannaouigou-verb **a** hag **e**. Reizet eo bet pep tra. Ober a ra gand ? e-leh !. Viou-koukoug a zo er skrid brezoneg.

HOMME (*e galleg*)

Mar gout ¹ den, sao deuz ar pri !

Ha bez treh d'ar Vezeventi !

Kenta lavar

Ar pezh a dremen deuz adaleg miz Du 1899 da viz C’hwevrer 1901, en eur gêrig vihan en-kreiz ‘tre Lannuon, Landreger ha Gwengamp. (Memez leh penn-da-benn).

Al Lez war diadrenñv kêr, tu kreisteiz : Gand eun diskenn ostaleri war an a-raog en tu kleiz, eun nor vihan er hao dre ‘n hini² ‘h eer da di chomaj Pipi ha Fantig, ozah-ostijenn (taol, torch, gwer ha boutaillou). En korn an tu dehou, war an a-raog ivez, stal Ber, penntieg, koataer, (bank, heskenn, morzol, etc...). Eur voger er foñs a zigor frank en daou du. En pep tu, stok eno, med diavêz al Lez, emañ o chom.

1. En tu dehou, Per ar Floh, ag an hini³ e komzom, gand e bried mon, o merh yaouank Perin hag eur paotrig. (Per, boesonier, a ra glahar e dud).
2. En tu kleiz, Jozon, intañv, mestr-kereour, gand e vab, paotr yaouank, Erwan, fur o-daou ; Jord Forll, mevel kereour, penher emzivad, mestr d’e dra, den feulz ha diboell, boesonier ha didalvez ‘vel e amezeg Per ; hag ar vatez, Naig Flamm, plah koz, bouzare.
3. Pelloh er memez ti, ‘mañ ti Fañchon, plah yaouank koz-viret, roulerez ha plah en heh êz, heh-unan.
4. Ha pelloh en tu dehou, war ‘r gêr, lochenn landruillenn⁴ Yann gêz, devezour ha boesonier ives gand e bried direiz hag hudur, Katell, mezvez dalhmad, ha daou baotrig, o bugale.
5. Diavêz⁵, an amezeien-ze e teu Laou ar Briz, lesanvet Laou Vraz, kuzulier diwar ar mêz, penntieg kêr, pinvidig, rouser touet ! Gand e bried Marijan, eur plahig sempl ha fur. (Bugale ‘deus kalz), eur mevel-kêr, gward-kêr, hag ar Mêr.

¹ Mar gout : mar dout

² dre ‘n hini : dre b’hini, er skrid orin.

³ ag an hini : a b’hini, er skrid orin.

⁴ landruillenn : unan truillenneg.

⁵ Diavêz : Ouspenn

Erwan, mab Jozon, ha Perin, merh Per ha Mon, a blij an eil
d'egile ; Erwan, soudard, a zimezo da Berin en distro.

Jord Laou ha Per, Katell, Yann ha Fañchon, a zo penn-abeg
d'an trouz ha d'ar mesk dre o gwall vuhez ; Jozon, Mon hag
Erwan, en tu ar furnez ; ar Mêr hag e Ward gand al lezenn.

C'hoarierien

Tu kleiz	Tu dehou	Diavêz
Pipi, 28 vloaz, ostiz.	Per, 43 bloaz, koater ha koñvers.	Laou ar Briz, 53 bloaz, diwar ar mêz.
Fantig, 25 bloaz, ostiz.	Mon, 40 vloaz, koater, ha koñvers.	Marijan, 47 vloaz, diwar ar mêz.
Jozon, 58 vloaz, kere,	Perin, 17 vloaz, koater, ha koñvers.	Mével-kêr, 50 vloaz, , diwar ar mêz.
Erwan, 21 bloaz, kere.	Paotrig, 8 vloaz	Ar gward, 50 vloaz, deuz kêr.
Jord Foll, 30 vloaz, kere.	Yann gêz, 25 bloaz, paour.	Ar Mêr, 60 vloaz, , deuz kêr.
Naig Flamm, 53 bloaz, kere.	Katell, 22 vloaz, paour	
Fañchon ; 50 vloaz, heh-unan.	o daou vab, 3 ha 5 bloaz.	
Daou diegez ha Fañchon ouspenn.	Daou diegez ha Laou Vraz ouspenn.	Eil tud, 'med Laou Vraz.

Penn-skrid

Kenvroiz ker,

War a welit, ar c'hoari a dreem en penn da benn dirag ostaliri Fantig-Pipi, leh e skeudenn a beb eil :

1. Ar baourentez der ar prejou Yann gêz.
2. An dud entre⁶ dre Jord Foll, Per ha Fañchon.
3. Ar binvidigez dre Laou ar Briz pe Laou Vraz ;
Oll kollet gand an evajou.

An eil hag egile, mignoned, a ro skweriou sklêr ha gwirion d'an oll da drei diwar ar vezventi, glahar an dud kêz en peb bro : 'M-eus ket klasket penta na liva peziou gevier ; ar pez a dremen a zo gwirioneziou oll, c'hoarvezet du-mañ du-hont ; ar vuhez 'vel m'emañ, netra ken, evid ma vo êzetoh kaoud an tu ar muia deread da zond a-benn deuz ar walenn euzuz-se. On gouenn-dud, unan a rr genta deuz ar Bed ! a gle da genta rei he oll nerz da drehi an tech fall ha milliget-se, a sko hirie ker gwaz war he bugale. Ra deuy d'am skoazell an oll dud a galon hag anaoudeg a Vreiz-Izel : Ra deuy ma leorig, harpet gante, da stoka kalon ma henvroiz ker, ha d'o distrei diwar an oll evajou noazuz anvet an alkol ; ma vo diskaret da viken ar vezventi hudur en or Bro venniget a Vreiz-Izel !

Setu ma oll mennad.

Mar 'm-eus faziet tu-pe-du, me ho ped d'am damanti, em distro halleg dreist-oll.

Gwerleskin, an deg a viz C'hwevrer 0901.

⁶ An dud entre : an dud en o êz.

Arvest kenta

An dizurz

(En mare miz Du 1899)

Kenta pennad

Al lun

I

(Per ar Floh, koater 'n e stal en tu dehou ; Fantig hag he gwaz Pipi, ostizien, en davarn⁷, tu kleiz ; ar re all a-gleiz hag a-zehou).

Per

(outañ e-unan, 'n eur eva dour deuz ar voutaill)

War-lerh an evajou e kaver flak an dour,
Ha digalon daonet e kroger el labour !..
(Hag eh a d'e stal).

Fantig

(D'he gwaz o nêtaad gwer).
Beb lun en em gav tud : netra 'vez prientet ?
Ma ne daolom evez e vefom rivinet !..
(Hag eh a kuit. Pipi 'ra eur zav skoaz gand fae).

II

Fañchon ha Yann gêz a deu deuz a n tu kleiz

Fañchon

Di Fant 'teuan dalhmad : amañ 'ven⁸ stok er gêr !

Yann Gêz

C'hwi rankit ket, Fañchon, evel dond dre laer.
Katell, c'hwi 'oar ervad, hag hi mzevez bemde'
A deufe d'ober trouz war ma lerh ma ouezfe ?

Pipi

(Deze)

Leverit petra 'po ?

Fañchon

Hini-kreñv p'on war yun !

Yann Gêz

Ha 'mo memez tra bete ma 'mañ al lun !

⁷ en davarn : er skrid ; er c'hawen" (?)

⁸ ven ; vezan.

(An ostiz a ziskenn)

III

Laou ar Briz, kuzulier, Jord Fall, kereour, a deu deuz an tu dehou.

Laou

‘Vid red eo dem, Jord Foll, ne deuy daou gamalad,
Dirag ostaleri en zeh⁹ d’en em guitaad !
(En eur ober eur hammed ‘trezeg stal Ber).
Aze ‘out, Per ar Floh ?... Gra ‘veldom, ma kerez !
(Da Laou ‘n eur zistrei).
Ma amezeg koater !...

Laou

(gand mall)

Gwir a-walh a lerez ?...

(Yann ha Fañchon a ev ; an ostiz a ziskenn).

Per

(o tond)

Demad deoh, aotrou Briz ; penaoz emañ ar bed ?

Laou

(o rei e zorn)

Distiñget ! ma mignon ; mar ga koulz all ganet¹⁰ ?

Per

(‘n eur vale)

Eo da ! n’e’ ket gwir ‘ta, Jord ? Dalv ket ober gwad fall !
(Yann ha Fañchon a hast nêtaad o gwer).

Jord

Sotoh a ze ‘vefem ! Lezom se gand re all !
(Hag eh eont d’an ostaleri, leh en em zaludont oll).

Yann, Fañchon ha Pipi

(en eur wez)

Devez mad ! deoh, gwersed !

An tri all

Ha deoh oll !

Laou

(da Jord ha Per)

Petra ‘vo ?

Jord

⁹ en zeh : heb eva.

¹⁰ mar ga koulz all ganet : mar da koulz ganez.

(‘n eur zelled deuz Per).

Eur banne hini-kreñv ?

Per

Ya, dao !

Laou

(D’an ostiz)

Tri war eun dro !

Hag e taol eur pezh pevar real war an daol.

An ostiz a ziskenn prim-ha-prim.

Laou

(‘n eur zelled d’an neh).

Gwall vraz ‘talh an amzer ?...

Fañchon

Ral e’ klouar iskiz !

Pipi

(ar bannahou diskennet)

Mezaon eo erru deom an hañv braz war e giz ?

*(Yann Gêz a daol e bevar gwennege evitañ ha Fañchon ;
med Laou Vraz a ruz aneze a-gil-dorn ‘n eur lared, krog ‘n
e werenn).*

Laou

Mir da bevar gwennege a gavi eur wech all !

(Hag eh evont o-zri. D’an ostiz)

Ar pezh-se ‘zo da vond : diskenn ‘ta dem gand mall !

Ha d’an oll memez tra !

Yann Gêz

(gand nerz)

Laou ar Briz a zo den !

Sort dezañ er barroz ne vo ket kavet ken !

Jord

Kuzulier e’ e-barz, ha da viken e vo !

Per

Atao heb votadeg, ne¹¹ ar muia mouezio !

Fañchon

(he divreh en êr).

Pleeh n’en-defe ket ? Eun den ar sort ma’h e’ !

Laou

(o trinka)

¹¹ ne : e-neus

‘Garan ket re a veel¹² !
(*D’an ostiz*)

Prient dem ar hafe !

Jord
(*o trinka*)

‘Lezfom ket er heit-se an amzer dond da goll ;
Yehed, Laou !

Ar re all
(*en eur wez*)
Yehed deoh !

Laou
Lod ho krasou mad oll !
(*Hag eh evont*).

Jord
(*‘n eur daolia moneiz war an daol*).
Kemend-all dezu ma ferz !

Laou
Se ‘vefe re dioustu !...

Yann
Me ‘mo Rom, Pap hag all !
(*C’hoarz*).

Per
Ha me berlañch gwin-ru’ ?

Fañchon
Me ‘mo ‘vel ar re all : din-me mad ar sort ‘zo !

Jord
Kalz primmoh, Fañchonig, e yel’ an treou¹³ en-dro !
(*Oll, krog ‘n o gwer*).

Per
(*gand nerz*)
Tro d’ar werenn ! Paotred !ha pouez-traoñ d’ar re-mañ !¹⁴
Ha traou d’an daol, Pipi ; ma zro-me ‘zo bremañ !
(*Hag eh evont adarre*).

Pipi
Me ‘zo prest da ziskenn, pa lorfet petra ‘po !

¹² veel : re a veuleudi.

¹³ an treou : an treo, er skrid orin ; an traou.

¹⁴ Tro d’ar werenn ! Paotred !ha pouez-traoñ d’ar re-mañ ! : Gouloñderom ar werenn ! hag int a yelo kuit e-barz or gorzaillenn.

Per

Eur voutailad gwin-koz, entrezom ; hast afo !

Yann

(‘pad ma tiskenn Pipi)

Ha pa vo peurlipet ‘vo kemend-all dioustu ;
Rag me n’on ket, paotred, eur hreñcher¹⁵ el ludu !

Fañchon

Ha goude war ma hont, da lakaad er hafe
‘Vo kognag ar gwella : d’ho yehed, aotroune’ !
(Hag eh evont).

Fantig

(He fenn en nor)

Beza ‘zo kafe tomm ?

Laou

Diskenn neuze buan !

Er heit-se da hortoz ni lako edun tamm tan.
(Butunad a reont).

Ha bremañ da ziskouel om dineh ha laouen,
Per ar Floh a gano eun tammig kanaouenn !

Jord

Daonet vo an diaoul ! Laou ‘zo leun a ijin :
‘Hanta, Per ! distag dem eun da zoniou lirzin !

Per

P’hini ‘kanin-me deoh ?

Yann

An hini ma kiri !

Fañchon

Plijadur ar mezhvier ‘barz en ostaliri !...
(C’hoarz. Fantig a deu gand ar hafe ; Pipi en tu all).

Laou

Krak ha berr, ma homer ! ha Fantig er keit-se,
‘P’on-o kleuzet dezi ar gwer o hargo a gafe ! ?
(Hag e riñsont o gwer. Per a gan, war don ar “Merhetaer Prosper Proux“).

I

Ne gredan ket ‘ve plijadur ! En he lerh dre ar bed oll,
Evel hini eur boesonier pa vez tre diwar e roll !
Nan eus na glahar nag hirvoud, na nehamant gand netra !

¹⁵ eur hreñcher : eun tufer, unan a duf.

Evruz e vez korv hag ene pa vez deuz taol oh eva !!
(Entre pep koublad, Yann ha Fañchon 'ra dañs an ours !)

II

An neb a vefe trubuillet e damm spered noz ha de',
Pe egaset gand tud tañgnous, kerent, gwreg ha bugale,
Gand eur bannahig gwin-ardant eh ankouezo berr-ha-berr ;
Evrusa stad, pa lavaran, ez eo doare ar mezhvier !

III

Ar vuhez-mañ a zo ken berr, mar deo sod-mad da staga
Ar re na glaskont en enni nemed dastum peadra ;
A ranko, eveldom, koulskoude, eun devez kent mond ahann,
Serri o daouzorn war netra ; kaved trubuil ne dalv mann !

IV

Kanom stard ! eta, kenseurterd ; kanom oll dibouez or penn :
(Oll en eur wez)
Enor da Zoue koz Bakus ! ha da baotred ar werenn !
Tro d'an dañsou ha d'ar merhed ! Beh da vad d'ar jabadoa !!
Ha plijadur gwalh ar galon ! en tro 'pad an amzer vrao !!!
(Pipi ah a d'e di).

Laou

(dioustu)

Chao ! strakadeg daouarn ! en enor d'ar haner !
(Hag e strakont o daouarn).

Jord

(krog 'n e werennad kafe).

Hag evom d'e yehed !...

(Trinka a reont).

Fañchon

(he diouverh en êr).

Pegen berr an amzer !...

Fantig

(o lakaad eur voutaillad kognag war an daol).

Lakit en ho kafe.

Laou

(mezo, krog er voutaill)

Peurlipet 'vo dit prest !

(Hag e ro anezi da Jord).

Goude 'vo ar champagn : degasit din ma rest !

*(Hag e taol eul louiz ugent lur war an daol. Fantig a lamm
gand ar pez ; med kerkent, Katell, gwreg Yann-Gêz, 'n eur gav,
mezo-dall, deuz an tu kleiz : an oll sebezet).*

Katell

(d'he gwaz, 'n eur vounta anezañ).

Aze 'out ! evelkent, stalikenn¹⁶ divalo !

Distok prim alese, pe me za tiskoko !

(Hag e lamm gand e werennad kafe, an hini¹⁷ lonk a-daol).

Yann

(droug ennañ)

Petra 'glaskez aañ ? hast 'n em denn alese :

Te 'zo da leh er gêr war-dro da vugale !

Katell

(fuloret)

En-pad 'vi-te amañ o c'hoari tamboulin

Gand ar rampenn¹⁸ louz-mañ, a sklabeven dioustu !

(Hag e ro eun taol bount da Fañchon)

Fañchon

Sellet hi ! marh an noa ! gand he beg put a-raog !

(Katell 'lamm ganti 'vel eur bik hag en em gannont da vad.

Yann ha Per 'glask

harz aneze).

Laou

(o c'hoarzin deuz e wasa).

Lest aneze ! lest aneze ! da ober eun tamm krog ! !

Koueza a reont ha Per a deu kuit ; Yann, mezo, a glask o sevel, med koueza 'ra d'e dro hag e chom evelte kousket ; fentuz).

Fantig

(o tond deuz ar hao)

Diskrog aneze, Jord Foll !

Jord

Gwell 've ganen kregi !

(Hag eh a 'vid pokad da Fantig, an hini¹⁹ 'n em ziframm hag eh a 'vid mond d'he zi ; med Laou he harz, 'n eur hoarzin bepred).

Laou

Na vezez ket ken droug, Fantig !

Fantig

(a hop)

¹⁶ stalikenn : haillon.

¹⁷ an hini : p'hini, er skrid orin.

¹⁸ rampenn : an oll dud.

¹⁹ an hini : p'hini, er skrid orin.

Buan amañ, Pipi !!

(Pipi 'deu kerkent 'n eur rei eun taol da Laou, an hini 'h a pell da goueza, leh eh êsa sevel heb druzoni, kement ha ken buan ma chom kousket evel an tri all. Med Jord a ro eun taol dorn war fri Pipi ken eh a da goueza er hao ! hag eh a war-lerh Fantig, an hini a hop. Pipi a gan, gwad deuz e fri, droug ennañ).

Pipi

(e vreh astennet).

A-walh 'peus greet bremañ ! me 'h a da glask ar mêt ?
Ha bremaig 'vo, me 'dou, lakaet tomm war ho ler !
(Hag e red kuit Fantig war e lerh).

Per

(da Jord)

Difaziom, Jord Foll ! Ha tehom ahalenn !

Jord

(divatet)

Tapom peb a litrad, 'velkent, 'taog en em denn !
(Tapoud a ra ar restad boutaill chomet war an daol ; rei a ra eun all da Ber, ma tehont kuit 'n eur vrañsellad en eur sika²⁰ aneze 'n o bruched. Fentuz).

VI

Jozon ha Erwan, e vab 'deu kerkent deuz o zi.

Erwan

(o tond)

Jord ! kaerra taolenn !

Jozon

Moarvad 'n-eus ket amzer
Gand ar bres da rouli, da zond d'e bred d'ar gêr !

Erwan

Sellit ! kaerra taolenn !...

Jozon

(gand engras²¹)

Diwar boeson an dud
E kouez kalz izelloh evid al loened mud !...
(gand nerz)
An alkol e' d'an den an enebour brasa !
Ha brezel 'rin dezañ, atao deuz ma gwasa !
Ober a ra muioh a haou deuz an dud kêz !
Eged an teir gwalenn : brezel ! boeson ! kernez ! !

²⁰ sika : lakaad e-barz.

²¹ engras : heug.

Gantañ ‘vezer didalvez, hudur ! laosk ha dister !...
O ! Erwan ; ma ouezfen ‘vefes biken mezhvier !
‘H afen gand an anken d’am bez war-lerh da vamm !
D’an hini²² ‘m-oa touet dond d’az sevel divlamm ! !

Erwan

An hini vad ‘poa greet ! ha me ‘lar deoh, ma zad,
Ne vin biken gwelet en eun heveleb stad :
Droug a-mez deuz tud vezo ha kaz deuz ar boeson !
Tehom prim ahalenn ; sevel ‘ta ma halon !
(Hag e red kuit).

Jozon

(E vreh astennet)

Ne weler ken bemdez ! ‘benn ar fin, pa laran !
‘N em gavo gwalleuriou en ostaleti-mañ !...
(Hag eh a kuit war-lerh e vab).

VII

Fantig ha Pipi a deu kerkent war o hiz

Fantig

(o tond)

Atao da glask ar Mêr ! red e vefes sod-mad !
Hast buan dond amañ !...
(‘N eur drelata da hoarzin).

Sell na petore stad ! ! !

Klask mêriou da weled ar seurt-mañ ‘n em lipad !
Neuze ‘vad ‘pije greet eun taol paotr dilikad !...
Lakaet koll ar vrud vad deuz on ostaleri ;
Rei an tu kenta gwech da zond ‘med d’he serri !
Eun ostiz fur, Pipi, ‘ra an nebeuta trouz,
A walh sioul e-unan er gêr e zillad louz !
(Kregi ‘ra en divesker Yann Gêz hag e lavar) :
Krogom ‘barz en tri-mañ a hini da hini
Hag o stlapom buan da draoñ ar marchosi.

(Ober a reont : ‘n eur leuskel Katell an diweza).

Taol honnez war ar bern ! prenn mad an nor warne !
Ha kerz kuit dre a-dreg ! Lez Laou vraz ganen-me !...
(Mond a ra da furchal Laou hag a laer dezañ e yalh).

Hemañ,, war a glevan, en-deus ar pezh a gar :

Ha me vez sod a-walh da chom atao war var !
Doue pa reas an traou a laras : « Chaniskrab²³ ! »
Laer ‘ta ! pe ‘vi laeret ! an hini a dab dab !

(Hag e sink ar yalh ‘n he bruched).

(Neuze e hij anezañ da vad, ma tiwan en eur zistrevia)

(Gand eur vouez flemmuz).

Kleo ‘ta ! Laouig ar Briz, kuzulier braz ar Zaon !

²² D’an hini : Da b’hini, er skrid orin.

²³ Chaniskrab : ? (Chann iz krab ?)

Moarvad a-benn bremañ ho-peus eun tamm naon ?
(Hag e zikour da zevel).
Ma karez 'n em zikour ha dond ganen d'am zi
Me roy dit da leina deuz ar sort a giri !

Laou

(o vond ganti gand mall).

Fantig koant ! te 'oar mad on prest da vond ganet²⁴ !
(Oll, kuit).

²⁴ ganet ; ganez.

Eil pennad

Deiz war-lerh, meurz ar beure.

I

Mon, gwreg Per, ‘deus d’ar stal digarez kerhed skolpad

Mon

(outi heh-unan)

N’e’ ket rag²⁵ bugale eo prezeg da re vraz ;
Med bremaig e klevo e bater eur wech c’hoaz !...
Prestig e teuy d’e stal, (n’e’ ket da labourad) ;
Rag klañv eo adarre diwae he re gorvad !
(Hag eh a er stal).

II

(Per a erru kerkent, klañv ; hi deu a-zous gand he barillad skolpad)

Mon

(truezuz dezañ)

O ! Per,, me fried ker, out adarre kouezet,
Gwasoh evid biskoaz en da dech milliget !
Taol labour ebed ken ! rouli bemdez-bemde’ !
Na, m’hellfom biken pad ma ken dalhez ‘vel-se !
(Hag e tiroll da ouela).
Ranket ‘m-eus, te ‘oar mad, heb mar, dond da werza
Eun tamm deuz ma danvez evid gelloud paea,
Hag az-poa touet din dirag Roue an neñv,
Ne evfes biken ken eun dakenn hini-kreñv !
Ha c’hoaz az-peus, o ! Per ! da lakaad war an tre
Dre da vuhez diboell, ma ha da vugale !

Per

Entrezoh, merhedou, e talhit peb a flemm ;
Biken vezot diskarg ! dalhmad e vezoh o klemm !
Goude beteg amañ n’eus souetet dit netra
Ne rez ‘med heskignad ahanon ‘pad ar bloa’ ;
Koulskoude, te ‘oar mad,’benn beza didamall
E rankan heuill ar bed, ober ‘vel an dud all :
An neb a zalh koñvers a rank kemer ha rei ;
Lakaad komz anezañ ; mond a-zehou hag a-gleiz ;
Ha ‘vel ma oar an oll ne reer netra ‘bed ken,
Na kloza neb marhad, na kaozeal gand den,
‘Nez kemer eur banne, ar hiz eo en peb leh.
Ma ‘n em gaver buan mezo-dall, heb goud deh²⁶ !

²⁵ rag ; dirag

Mon

Digareziou fall-ki ! koz kaoziou roulerien !
An neb a gar diwall ne vo mezo foeltr biken,
A ev da vihanna hini dous, mar de' red,
Kemer deuz evachou 'benn kerzed dre ar bed.

Per

Krak ! diwar ar seurt-se on hirie ken klañv !
'Vid deuz kas²⁷ likuriou biken ken na evan !

Mon

Nah oll aneze neuze ! ar gwella, kalz a vez ;
Ma ne gerez diwall e vi paket ivez :
Sell en-dro dit ha gwel, nag a bed dre voeson
'Vez rivinet bemdez pe a goll o rêzon !
Sell deuz an nive spont 'vez dizehed gantañ !
(Heb eñvel den, te 'oar, 'maint a-vern er gêr-mañ).
Falhet en-kreiz o brud ! skoet krenn d'ar maro !
Hep komz deuz ar re zod 'h a d'an ospitalio',
'Deus lezet war o lerh ar vrasa paourente'
Intañvezed yaouank gand berniou bugale !
Na gemer ket Jord Foll na Laou-Vraz da villour !
Kemer skwer deuz Jozon, da mezeg kereour ;
'Oa ivez boesonier en e amzer genta,
Hag abaoe n'ev takenn eo eun den ar furra !

Per

Hag eh e' petra well ? heb lared outañ fall,
Ez eo 'vel eur gaouenn en-touez an oll dud all !
A boesoniu, moarvad, a zo greet da eva :
Sell nag a ostizien 'zo oute o veva ?...
Lared a ran dit c'hoaz 'ranker kemer ha rei !
Dindan boan da veza kemeret 'vid eur bleiz !
Eur pemoh ! 'ma an oll dalhmad deuz her goapaad !
Hag e rin-me petra ! a-eneb eur seurt stad ?

Mon

Biskoaz digareziou ne vankas da zen fall :
Me 'lar dit-te furroh ha muih didamall,
An neb a zalh e benn, eged e' an hini,
En em ro eveldout ker gwaz d'ar vezventi !...
Gwalleur ! Per, d'an hini en em daol d'ar boeson ;
Pistriet 'vez gantañ abred korv ha kalon !
Koll a ra e amzer, e yehed hag e dreo²⁸ ; ;
E vuhez 'h a da heul ! setu stad an den mezo ! !
Ma karfes labourad, eur vicher seurt az-peus.

²⁶ deh : deoh.

²⁷ 'Vid deuz kas : evid eva seurt likuriou.

²⁸ e dreo : e draou.

Ni a vevje amañ evruz, heb kaoud gwall reuz ;
E-leh ma kendalhez, prestig 'vefom paour-du !
Entre treid ar bed ! disprizet a bep tu ! !

Per

(geizou)

Terri 'rez din ma fenn ! em hini²⁹ 'm-eus poan !
Krana 'ra ma memprou ! em hleuz ema an tan !

Mon

Kaer 'nez eur seurt kleñved gwaska stard ar mezhvier
Eh ankouez anezañ, siwaz ! en barr-amzer !

Per

Didrouz dit 'laran dit ! ha teh diwar ma zro !
Re glañv on da zelaou kemend-all a gaozio' !
Evid feteiz, bepred, deuz boeson na stokan :
Red eo beza gwell zod 'benn 'n em lakad ker klañv !

Mon

(o vond kuit)

Ouspenn kant gwech 'peus greet dirazon al le-ze,
Hag e kouezez mezo-mik 'benn eur pennad goude.
(kuit)

Per

(outañ e-unan)

Ne ran ket kalz a van o kleved koz-verhed.
'H an da hourvez eun tamm :
(Geizou)

O ! me 'garje kousked !

(Hag e hourvez 'n e stal).

²⁹ em hini : em pehini, er skrid orin.

Trede pennad

Prestig goude Jord Foll 'deu deuz an tu kleiz 'n eur gana :

Jod Foll
(*war eun ton anavezet*)

I

Me a zo eun den yaouank, n'am-eus na tad na mamm ;
N'am-eus na mamm na tad ;
Hag em-eus eun tamm danvez, ouspenn eru vicher vad,
ya 'vad !
Arhant en ti an noter : Ya 'vad !ha kereour mad.

II

Me a zo war an douar dezu ma stad laouen-braz.
Laouen-braz deuz ma stad.
A zalho 'pad ma buhez d'ober warnon chervad
(*da vond*)
'Pad ma buhez me zalho da vond d'ober chervad.

III

Er heid m'am-eus da veva ne zimezin biken.
biken ne zilmezin,
Me 'mo gand ma arhant kement seurt a garan,
laran !
Gand arhant me 'mo dre oll, 'laran, pez a garan !

IV

Da genta pa 'mo sehed, ne evin ket a zour,
deuz dour ne stokan ket ;
Deuz ar gwella evachou 'kemerin mar bez red !
Evachou deuz ar gwelala'mo bepred deuz eur red !

V

Mar dichañfe din debri kent mond ahann ma zreo !
ma zreo kent mond ahann !
Me 'labouro c'hwek, neuze war ma lerh 'chomo mann
o ! mann !
Neuze c'hwek me labouro :mann war ma lerh ! o ! mann !
(*Hag e kaoze*)
Med n'e' ket se e' se ! dem bremañ da gaoud Per !
'Michañs e' divantet-tre abaoe an neizeur :
Sehed em-eus da vad ! e fell din eva
Anez kaved eur re dond ganen da drinka.
(*Hag eh a da stal Per*).
Kleo 'ta, Per ! Aze 'out ? ... Gourvezet 'vel eul leue
Kement-se a boan bleo, hirie deuz ar beure ?
(*Hag eh hij anezañ*).

Per

(o sevel war e zaouhlin)

Klañv fall on da vervel.

Jord

Se n'e' netra, m'hentou !

Deus ganen 'di Fantig ha me roy dit louzou :

(sevel a ra)

Taol war da galon-noaz eur banne kognag mad

Hag e weli goude hag-eñ me 'zo gaouiad.

(Hag e krog 'n e vreh).

Per

(o vond)

Ma ouezfen 'vefe gwir ? sehed a-walh em-eus.

Jord Foll

Pa vi klañv ev atao eur banne hini beuz³⁰.

(Erru 'tal an daol war an hini³¹ e sko da vad).

Digor da zor ! Fantig !

II

Fantig

(ema o tond)

Deiz mad, deoh, Jord ha Per !

Penaoz emañ ar bed ganeoh 'baoe an eizer³²?

Jord Foll

(mignon deuz Fantig)

Mad a-walh, Fantig koant, med Per 'zo eun tamm klañv.

Peb a vanne kognag ? Ma wellao dezañ.

(Hi a dap gwer).

Jord

(Hen harz)

E-barz en gwer brasoh ! Deuz da hini gwella :

N'e' ket arhant, Fantig, a vanko da baea.

(Hag e tispak eun dornad).

Fantig

(añviuz³³)

Krog mad out adarre, war a welan ganet !

(Hag e tiskenn)

Jord

('n eur fougeal, krog 'n e wrenn)

Biken din ne vanko ! na pa laboufen ket...

³⁰ hini beuz : hini mad-tre.

³¹ an hini : b'hini, er skrid orin.

³² eizer : neizeur.

³³ añviuz : gand gwalle'hoategez.

(Eva 'reont : Per a gren e zorn).

Fantig
(Flemmuz)

Hag e lezez Fantig, heh-unan, da zelled !

Jord
(gadal)

Red e' din da bedi ?... N'ouzout ket moam sehed ?

Diskenn dem memez tra, kemer sort a giri !

'Lezan den da zelled en eun ostaleri.

(Hag e taol arhant dezi).

(Ar bannahou diskennet, Laou Vraz 'n em gav deuz an tu kleiz).

III

Jord Foll

(o skei pevar gwenneg all).

Diskenn prim deuz ma ferz kemend all da Laou Vraz !

(An ostizez a ziskenn).

Hini mad leiz ar gwer ! me n'on ket maro c'hoaz !

Laou ar Briz
(trist)

N'e' ket gand bannahou emañ bremañ, paotred :

Deh da noz en ti-mañ, ma arhant 'm-oa kollet ;

Me 'gred int bet laeret memez deuz ma godell,

Ha Fantig a gle goud n'int ket eet da bell ?

Fantig

(dre zroug, he daouarn war he hroazellou)

Bete emañ, kleo 'ta ! on bet plah fur, Laou-Vraz !

Ha deuz neb laeroñsi ne oan tamallet c'hoaz ;

Ha ma ne zalhez klenk da deod en da heno'

'Ri daou her³⁴ deuz unan dirag barner ar vro !

Laou

'Vezez ket klen divergont ! rez nebeutoh a drouz !

Homañ, war a welan, 'zo din eur gwall dro louz !

(Hag e skraba kostez e benn).

Koll daou pe tri-hant skoed : arhant ma merourien !

Fantig
(a droh e gomz)

Me 'lar 'vin ket mesket en kaoziou roulerien !

Laou
(pinous)

³⁴ daou her : ? "diou c'hir" er skrid orin.

An neb a goll arhant ‘n-eus droed da glask aneze ;
‘M-eus ket laret ‘vid se ez int eet ganez-te !

Fantig
(*ifrontet*)

Deh ‘oas eet gand Fañchon ahann ‘vid mond d’ar gêr ;
Ma oas ganti henoz n’ouzon ket kalz piou e’ al laer :
Ha mar ‘peus c’hoant, kleo ‘ta ! da veska koz kaoziou,
Me ‘zo prest pa giri da lenn dit ar hartou !

Jord Foll

Peoh war ze ! a bep tu. Neb a lez e flemma
Ma kar ne raio ket ; trinkom ! se ar gwella.
(Hag eh evont oll).

Laou

(*‘n eur gravad kostez e benn*).

Fant kêz ! prest din deg skoed ! ‘n em holo a vo red ;
Rag ma oar Marijan, peurdroio he spered.

Jord

(*o vond prim ‘n e hodell*)

Ma kerez ‘po ouspenn ! me ‘bresto dit aneze :
Greet om d’or plijadur an eil ‘vid egile.

Laou

(*o kemer*)

Bennoz Doue ! Jord Foll ! te ‘peus eur galon vad !
‘Chomin ket pell e hlee :
(*D’an ostizez*) :

Degas dem boutaillad !

(*Hag e taol ugent real war an daol, hag e vount ar re
all ‘n e hodell*).

Per

(*da Laou*)

Te ‘zo ar sort n’eus ket !

Fantig

Larit deuz petra ‘po !

Laou

Eur voutaillad champagn ! a-raog ma’z in em zro.

(*Fantig ah a d’an ti hag a deu kerkent gand champagn hag e laosk al leh d’an
neh³⁵ (c’hoarz). En-pad ma tiskenn, Yann-Gêz ‘n em gav mezo-dall deuz an tu dehou, hag e kan.
Pipi ‘deu ivez deuz e du pa glevo kana*).

IV

Yann-Kêz

(*war don “Soubenn al lêz“*).

³⁵ e laosk al leh d’an neh : e tenn ar stouv.

Homañ ‘zo eur zoubenn na vank netra enni, ne vank enni netra.

N’en-neus ezomm ken ‘med Yann-Gêz da zikour he zañva !

Pipi

(gand nerz)

Ne houlan ket, paotred, e refot ‘barz em zi,
Evel ho-poa greet deh kemend a reveulzi !
(Hag e sell put deuz Jord).

Fantig

(da Jord o tistana)

Kas Yann kuit d’ober trouz ! ar sklanker divalo !
Mad ‘med da hlaourenni ha d’ober skodenno.

Jord

(da Yann, ‘n eur vounta anezañ kuit).

Hast mond deuz leh ‘out deut ! Gand da zouben al lêz,
Pe vezi prest pegeid a gas beg ma botez !
(Yann kuit ha Jord war e giz).

Laou

(krog en e werenn)

Trink ganem, ma kerez ! ma zro diweza ‘zo !...
(Oll krog ‘n o gwer)

Per ha Jord

(assemblez)

Da yehed Laou ar Briz !

Pipi ha Fantig

D’ho krasou³⁶ mad, Aotrou !

(Hag e hanter-evont o gwerennadou).

Laou

(o tañva)

Hemañ ‘zo distiñget !... Ma oll gourhemnennou !

Pipi

(gand lorh)

Ne gredan ket e ve ar seurt dezañ er vro !

Per

Bremaig da echui, e tegasi Porto !
Rag me pa n’on ket lor a ray ivez ma zro.

V

Med kerkent en em gav Mon gand Marijan, gwreg Laou.

³⁶ krasou : yehed.

Mon

(o tond)

Laret mad em-oa deoh : emaint amañ o-zri,
'Vel tri bez didalvez ! krog adarre da rouli !

Marijan

(trist, d'he gwaz)

Gwall iskiz e' 'velkent e chomfes tri devez
Dioustu da sklankenni ! ha da du en enkreiz !

Laou

(pinous)

E oan o vond raktal !

Marijan

Lez da zigarezio' !

Deus neuze 'ta ganen war-eeun, ha me 'gredo !

Laou

'Velkent ne zoñjan ket eh afen-me da heul,
War da lerh 'vel eul leue : ker gwaz ha Fañch-ar-Peul...
Kee war-eeun da di Soaz, a zo war hent ar ster,
Hag ahann dioustu 'h eom assemblez d'ar gêr.

Marijan

(disfi)

Ya ! ma kar mond Pipi da rei dit ar hundu !

Pipi

Bezit dineh ! me 'lar deoh, eh errufom dioustu.
(Hag e krog en breh Laou).
Deom dre amañ, a-dreg, ha gand den 'vefom gwelet.

Laou

(o hasta riñsa e werenn)

Peurevom hemañ 'tao !
(Da Jord ha da Ber en eur rei an dorn).
Keno³⁷ 'ta, kenseurted !
(Kuit o-zri).

Mon

(da Ber 'n eur zacha warnañ)

Te ivez distok kuit ! deus d'ar gêr ! eur vez e' !
O weled eun ozah a ra 'med rouli bemde' :
Prest on da ziodi pa welan ahanout ;
A-greiz n'evzejtes takenn, 'out adarre mezo-boud !

Per

³⁷ Keno : kenavo.

(gand nerz)

Eur forn domm, Mon ar Floh, 'zo êzet da hori !

Jord

(o hoapad).

War-lerh merhed n'in ket ! distro kuit pa giri !

Mon

(da Jord dre zroug)

Te 'zo abeg dezañ da ober evel-henn ;

Me 'daolfe ken buan e werenn gand da benn !

(Kregi 'ra en gwerenn Ber, 'ra ar van da skei gand penn

Jord, hag e skuill ar banne a chome).

'Vid hemañ 'lipo ket !...

Per

(kounnaret)

Mad ! greet e-peus a-walh ?

Bremañ n'in ket d'ar gêr ken vo skarzeta ma yalh !

Deus alese, Jord Foll, ha redom da di Soaz,

War-lerh Laou ha Pipi a dapfom eno c'hoaz.

VI

Jozon

(o tond a-daol deuz e di)

Kalz gwelloh 've dezañ pega war e labour !

(hag e kroaz e zivreh dirake)

Souezet on o weled, 'veldoh daou micherour ?

Daou zen en-kreiz o brud ! tud nerzuz ha disi,

O 'n em rei a galon kement d'ar vezventi !

Laret 'm-eus bet deoh c'hoaz, d'am mevel Jord dreist-oll,

Ma ne garit diwall eh efot da beurgoll !

Jord

(o kregi en breh Per gand goap).

Dem ahann ! Per ar Floh, evel daou baotr dijen :

Ni ne meum tamm ezomm kenteliou digand den !

(Hag eh eont kuit dre an tu kleiz kazell-ha-kazell).

Jozon

(o tistrei, e vreh en êr)

Se ne zell den er bed...

Per

(o vond gantañ kuit 'n eur hoapaad)

Kenavo eur wech all.

Mon

(deze, dre zroug).

Daou lankon milliget !

(D'an ostizez)

Te ivez 'zo plah fall !

Derhel 'neze 'pad an deiz da rouli en da di :

Me 'garje 've torret dit da ostaleri...

Fantig

(juntret he daouarn)

Pehed braz e-peus, Mon, o c'hoantad din ar gwall

Ma vijen ket amañ eh ejont e leh all !

Mon

(o vond kuit)

Biskoaz deuz ostizien n'eus bet 'med echu fall ?

Jozon

(o vond kuit ivez)

An den 'zo pennabeg pa ne gar 'n em ziwall.

(O-daou kuit).

Fantig

(Heh-unan)

Evel m'emañ ar bed eo red c'hoari ganti :

Friter ket a viou anez dond d'o zerri.

(Oll kuit).

Pevare pennad

Er memez deiz ; meurz d'abardaez.

I

Katell, tommet dezi, 'deu an tu dehou ; Fañchon dre an tu kleiz.

Katell

(o tond, gand stad)

Gwelet gand den, Fañchon.

Fañchon

'M-oa ket laret dit 'ta ?

O senti deuz Fañchon 'golli morse netra. :

(N eur ginnig eur brizenn)

Dre a-dreg, ma homer, eh erruer dioustu,

Heb beza evesaet gand kristen war ar ru :

Nan eus foeltr forz da zen petra ra pep hini ?

Katell

(n eur zelled a-gorn deuz ar hao).

Red eo kaoud finesa en amzer mom enni³⁸ !

Fañchon

'Vel-henn ni evo sioul ha direbech on-diou,

'N eur dremen lost-al-leue 'biou genou n'eus forz piou !

Katell

(o vond 'trezeg ar hao)

Te 'zo brao dit, Fañchon, dre ma'z out plah a benn

'War an oll doareou hag an tu d'en em denn !

Fañchon

(krog n he yalh).

Deuz ma gwella, Katell, med em-eus eur yalh verr !

Katell

(o tispaka he-hini, goullo)

Ha me unan hir ha moan, enni foeltr diner !

(C'hoarz).

Fañchon

(moneiz n he dorn)

Na dap ket keit an eil hag egile !

(Hag e sko war an daol).

Peleh out, ostizez ?

³⁸ enni : gwregel eo "amzer" evid an oberour.

II

Da Fantig o tond

Lak dem beb a vanne.

Fantig

Dioustu dioustu, Fañchon ! Petra 'zo deuz ho c'hoant ?

Fañchon

(dizimul)

Ar sort he-devo Katell !

Katell

(gand mall)

Ma, me, atao gwin-ardant.

(Fantig a ziskenn prim)

(Katell lamp gand he hini hag hen ev a-daol)

Fañchon

(dezi, krog 'n he gwerenn)

Daonet avad, Katell, gall zehed 'rankez kaoud,
'Barz en eun evadeg 'vezez barreg war ar maout.

Katell

'Choman ket da vlasa ma banne, 'vel 'ra kalz !
Ken akuit on warnañ, 'vel war yeot-glaz eur falz.
(Fañchon a ev deuz he hini).
Da gleuza gwer, Fañchon, 'm-eus ket kavet ma far.

Fañchon

Da waz ken akuit all a ev ar pez a gar.
C'hwi 'zo ral asamblez !
(Hag e peurev he banne. D'an ostizez :)
Memez tra dem on-diou.
(Hag e frot he bruched).
Êzetoh, Fantig koant ! eet e Laou-Vraz d'ar gêr.
E arhant, emezañ, n'eo ket kollet en neizeur ?
Kavet e-neus aneze ?

Fantig

(o tizimuli)

Kaerroh zo ne ray ket.
Piou a deu da retorn an arhant 'n-ez laeret ?
Moravad int bet flemmet en noz-mañ leh ma oa
N'a den da rei lojeiz d'ar sort-se 'vid netra !

Fañchon

(piket)

O ola'vad, Fantig, n'e' ket gwir kement-se,
Rag du-mañ 'oa henoz, degaset eur re.
Er beure-mañ o sevel em-eus her havet,
Kousket o tirohal a-dreuz war an oaled.

Fantig

(‘n eur hoarzin goap).

Kont da gaoz, Fañchonig, biken 'roi da gredi
'Ve ket chomet henoz yalh Laou-Vraz en da di !

Fañchon

(Fuloret)

Petra 'r foeltr a larez ? teod fall ha milliget !
Roulerez marteze ; med evid laer n'on ket !
Ha te baeo din-me ar pezh 'lares aze !
(Hag eh a war he lerh : Fantig 'red prim 'n he zi).
Arhant Laou 'zo amañ !me 'doufe war ma le ! !...

(Hag e ro taoliou treid d'an nor. Er heit-se Katell a grog 'n he banne an hini³⁹ 'lonk a-daol. Fañchon a grog 'n eur voutaillad treo 'zo dirazi er hao, a stank anezi deuz he fenn⁴⁰ hag a lonk da vad ; med kerkent e laosk ar voutaill hag e teu kuit 'n eur hopal, he daouarn war he bruched)

Fañchon

(spontet)

Pistriet ez on sur ! O ! Doue, ma Doue.
Skoazell ! tud d'am zikour ! 'h an da goll ma buez'
(Hag e kouez 'n eur dirohal.
Katell, strafuillet, a yud deuz he gwasa).

³⁹ an hini : p'hini, er skrid orin.

⁴⁰ a stank anezi deuz he fenn : a gemer anezi dre he gouzoug.

III

*Mon ha Perin he merh, Jozon hag Erwan e vab, ha Fantig,
a zilamm deuz o zi spontet oll*

Mon

(o tond)

Jezuz-Maria ! Petra 'zo c'hoarvezet ?

Jozon

(krog en Fañchon)

Ar medisin, raktal ! n'on⁴¹ petra 'deus evet.
(Katell 'ziskouez ar voutaill).

Fantig

(prim)

Doue ! deuz ma fetrol⁴² !em-oa lezet amañ.
(En eur zevel ar voutaill).

Ha kazi oll, siwaz ! 'deus lonket anezañ.

(Hag e teu deuz ar hao juntet he daouarn).

He hasit, 'n an' Doue ! Jozon kêz ! prim d'he zi.

Me 'droio ma spered ma varv 'barz em hini...

(Erwan ha Perin 'ra sellou ententabl⁴³ an eil deuz egile).

Jozon

(D'e vab ha da Fantig)

Krogit aze ho-taou ! m'ho savit en he sav ;

Ha goude, mar gallan, m'he skleñjo war ma skoa'.

*(Mon ra mad jezuzal hag e sammer anezi. Katell a hone
evid eva banne Fañchon hag e kemer an teh, med koueza
'ra, anez n'e' 'vid sevel : fentuz).*

Jozon, Fañchon war e chouk 'h a kuit, Erwan war e lerh.

Mon

(o vond kuit gand he merh, he sellou en neñv).

Da heul ar vezventi 'zo gwalleuriou bemde'.

Ha kaer 'zo rei skweriou, 'fureer tamm 'vid-se.

*(Skei a ra he zreid en Katell, an hini⁴⁴ êsa sevel heb
erruoud).*

Homañ 'zo ker boud all ! pa n'e' 'vid chom 'n he sav.

Fantig

(gand mall)

He hasom prim d'ar gêr !... Mon gêz, deus d'am harpa.

*(Hag e krogont unan en pep skoazell dezi ; med hi en em
reut a-eneb).*

⁴¹ n'on : n'ouzon.

⁴² fetrol : petrol

⁴³ ententabl : sellou evid en em gompren an eil egile.

⁴⁴ an hini : p'hini, er skrid orin.

Fantig

Chom war da dreid, louzenn ! pe me ‘grog da vad.

Mon

Pebez mez ! da eur vamm ! O ! Doue, gwas stad.

Fantig

(’N eur vond kuit ganti).

Ma ne deuez dre zent, ‘vi gwasket a-stejed.
(kuit).

Perin

(a zistro da lared)

Plah vezo e’ lousa tra a ouezfed da weled.

*(Med kerkent ERwan, deut war e giz, a ra sin da Brein ;
Perin a deu, hag e krog Erwan ‘n he dorn, ‘n eur lared :)*

Erwan

Deut e’ ma billetenn din dond da gamp Chalon !

Perin

(ankeniet)

Keit-se ! Erwan ! keit-se !... Glaza ‘rez ma halon !

Erwan

(gand stad)

Ar pella, ar gwella ! rag neuze ‘mo biken
Ar zorhenn evel kalz dond dalhmad da bourmen.

Perin

(o ouela)

Petra ‘deuin da veza, pa vi eet pell deuz Breiz ?
Ma-unan en toull-mañ, en-touez tud ken direiz.

Erwan

E kendalhi bepred da veza d’e êl-mad !
Harpet e vi, te ‘oar, gand da vamm ha ma zad !

Perin

(‘n eur zifronka)

Biriviken ‘vin laouen, ma ne furra ma zad.

Erwan

(he hoñjol⁴⁵)

Kemerom nerz ha feiz ! ar stad ‘h ay war wellaad !
‘Kerz ar bed, Perinig, te ‘oar, a deu, ah a,
‘Vel eur barrad avel e tro a-greiz-olla⁴⁶ ...

⁴⁵ he hoñjol : he frealzi.

(Hag e pok d'he dorn)

Kemerom esperañs ! an esperañs 'zo kaer.

Perin

(‘n eur zacha he dorn da vond kuit).

Me ‘garje eveldout, Erwan, beza seder,

Pegeid ‘peus c’hoaz da chom ?

Erwan

Eiz deiz, diwar hirie ;

Med a-raog kimiadi, ni ‘n em welo bemde’ !...

(Kuit, pep hini deuz e du)

Fantig a deu kerkent war he hiz

Fantig

(erru en penn ar hao).

Yalhad arhant Laou-Vraz, gand ar bannahou louz !

‘Zo abeg d’an taol-mañ a lako ober trouz :

Pa glevfet ‘vo Fañchon pistriet ‘barz em zi

E savo prest brud fall deuz ma osteleri ;

‘Ve ket laret an treo ‘vel e vint erruet.

(Dre zroug)

Biken bod deui ken em zi koz louzenned !

Deuzoute e taper dismegañs tro pe dro...

Dem bepred ! eur wech all, lestan⁴⁷ ! me ‘ziwallo !

(Hag eh a d’ar hao ; kregi ‘ra en eur voutailad rom hag e tisken en koach-dorn).

Eur banne rom bremañ, evdi en em greñvaad ;

Rag eur gawall aon ! am-eus bet aze ‘vad.

(Hag eh ev).

IV

Med kerkent Jord Foll a zaill warni deuz an tu dehou

Jord

(e zorn war skoaz Fantig)

Oholla ! Fantig koant ! na ev ket re a rom !

Mar ‘peus c’hoant evel Jord da chom e-barz da blom.

Fantig

Ro peoh ! rag ma ouezfes petra ‘zo c’hoarvezet !

(Hag e tiskouel ar voutail).

Fañchon gand ma fetrol ‘zo en em bistriet.

Jord

Hag eun taol mad a gaer ! eun dizamm mad d’ar bed !

⁴⁶ a-greiz-olla : a-greiz-oll (evid ar rim ?)

⁴⁷ lestan : ?

Mar de' kreuet gantañ me 'garje ne oa ket...

Fantig

Peleh emañ Pipi ? peleh e' manet Per ?

Jord

Pipi, Fantig, 'zo eet da gas Laou-Vraz d'ar gêr⁴⁸,
A oa mezo-mik-moged o kuitaad ti da hoar !
A-benn ma tistroio e vo savet al loar !...
Pe, kouezet o tond kuit a-hed war an treuzo,
'M-eus skleñjet d'eur hraou-moh kent ma oan deut en-dro !
Ha bremañ, Fantig koant... pa n'eus 'medom on-daou
'Vo gwel't penaoz 'vo kont !... Gand arhant 'vez kalz traou :
Da genta deuz em ferz e prienti dioustu ?
Ar hig rost gand gwin koz, ha goude kafe du !
(Hag e vount anezi en he zi).

Fantig

(a zistro da lared)

Ha ma 'n em gav Pipi ? Deuz-se em-eus eun tamm doan.

Jord

(astennet e vreh)

Ma kouez an neñv d'an traoñ, vem tapet dindan.
(oll kuit).

⁴⁸ d'ar gêr : d'ar gear, stumm Leon,er skrid orin.

Pemped pennad

Eiz deiz goude

I

*Erwan ah a da zoudard hag e kan e-unan, war don :
Paotred Ploumiliao.*

I

Keno ! kerent ha mignoned ! keno, ma bro Landreger !
O vond da zerji ma bro ma halonig 'zo seder.
Ya, gand stad eh an da harpa drapo ma bro venniget.
N'eus 'med eur skeudennig hepken a anken war ma spered.

II

Daoust d'am zad da chom e-unan ez e' joauz ha laouen.
« Peb deh yah a gle, emezañ, gand lorh douja d'alLezenn ! »
Ne chom war ma lerh er glahar 'med Perin, ma harantez ;
Dre ma'z e' boesonier he zad ne ra 'ned gouela bemdez.

III

Koulskoude 'hell en em harpa war ma ger ha ma halon ;
Biskoaz ne gerzis na ne ran nemed dre an hent gwirion,
Ha daoust ma'z eo mezhvier he zad, hi e' an hini 'garan.
Ha mar distroan birviken, Perin am-mo mar gallan.

IV

Keno 'ta ! kement a garan ! keno 'vid eur reuziadig ;
Deuz m'ua kerzo ar bed ganen me 'hell erruoud prestig.
Bepred kentoh evid tri bloaz, ma vez bolontez Doue,
'Vid distro evid mad d'er gêr ! el leh e chomin goude.

*Perin, eur mouchouar-godell ganti war he zremm a zispak
kerkent deuz an tu dehou 'n eur ouela.*

I

Erwan

(dezi, war don parrouz "Pempoull"

Na ouel ket, Perinig ! ha seh da zaoulagad.
Da zaelou a fraill din ma halon kent kuitaad.
Koulskoude te 'oar mad eh an gand evrusted,
Gand lorh da baea ma gle ! d'am bro vuiañ-karet.

II

Stad ar paour-kêz soudard 'zo meulabl, braz ha kaer.
E gorv 'ro da zivenn ar re n'hellont hen ober,
Harz a ra en dizurziou ! an oll 'zalh en doujañs.
Ober a ra war ar bed enor d'e vro gaer Frañs.

(hag e kaoze sioul 'n eur bokad dezi).
Harz 'rin ar Zaoz treitour hag ar Penn-Prusian
Dond amañ da laerez e Berin da Erwan.

Perin
(prim)

Ya ! ya ! red e' mond ! Kerz ! ha bale sonn da benn.
En-pad 'vi diank, Perin, a dorro he anken.
Ha halon yel' d'az heul dre bevar gorn ar Frañs.
(Med soucha 'ra he fenn)
Ha mar pefe neb droug.

Erwan

Bevom en esperañs ! !
(hag eh a 'vid mond kuit, mez hi hen harz).

Erwan

Petra 'zo c'hoaz, Perin ? mar gout⁴⁹ ken trubuillet.

Perin

Kalz a dreo 'deu buan, Erwan, war ma spered :
Ma zad 'zo boesonier ! marteze 'benn tri bloa',
Me 'vo eet pell ahann da honid ma bara.
Barreg e' ma kendalh d'on has da baour a-bez,
Ne houlfen ket, Erwan, 'timezfes d'eur vatez.

Erwan

Ha piou a deuy d'am harz ! neemdout e rafe' :
Seul vui, Perin, 'vi paour, 'kresko ma harante'.
Ha seul vui 'vi en poan e kresko ma anken.
Biken dispareet ne vefom gand kristen.
Bezom atao douget an eil 'vid egile :
Eun deiz 'vefom digollet. Keno, ma harante'.
(Eur pok ha kuit).

Perin 'chom da ouela war an teatr hag a gan prestig, war don : « Me 'wel ma dous war dour ar Folgoad ! »

I

Ma halon 'zo karget a hlahar,
Pa zoñjan em stad war an douar :
Gwalleur d'ar plahig kêz, me 'lar,
He-deus eun tad mezhvier ha digar.

II

Gand an dismegañs ! o ! gwsa poan,,
He yaouankiz a dremen buan !...
'Nez ankenia kalon Erwan.
Me 'chomje da viken ma-unan !

⁴⁹ mar gout : ma'z out.

III

Pawelan ma mamm baour o ouela,
Gand an displijadur 'pad er bloa',
Ma oll gwad a deu da yena,
Deuz ma zad a garan memestra.

IV

N'eus ket pell 'oam evruz gand ma zad,
A boke din gand lorh ha gand stad.
D'ar houlz-se 'oa war an hent mad ;
'Leh bremañ om gantañ 'n eur wall-stad.

V

Abae m'eo kollet gand ar boeson,
'Ra 'med ober droug en peb feson !
Mar dom gantañ en ivern don,
O ! Doue, na pebez ranngalon !
(He daoulagad en neñv).

*Mon, he mamm 'n em gav en korn allez 'n eur ouela, leh e
chom sioul.*

VI

Douen selaouit ma mouez kristen,
Trois diwar ma zad ar walenn.
Torrit d'am mamm baour he anken,
A-greiz-kalon 'ran deoh ma fedenn.
(Hag e taoulin da bedi. He mamm 'ra evelti, hag e pedont,
juntret o daouarn).

Eil arvest

Pevarzeg miz goude ; er memez leh

Kenta pennad

Yaou da noz, an dri a viz Genver 1901

I

Jord Foll ha Per ar Floh 'n em gav kazell-ha-kazell deuz an tu kleiz en eur vransellad.

Jord

(harpet deuz taol ar hao)

Beb a vanne mom⁵⁰ c'hoaz en ti Fantig-Pipi ?

Per

Neuze mompeb a zaou ? gra evel ma kiri.

Jord

Kerz 'ta ! 'vid peb a zaou !

(Hag e sko war an daol)

Pipi ! Fantig !... N'eus den ?

Per

Eet int da weled o zud da Drebeurden.

Jord

An diaoul d'o skleñja dibouez o bleo d'ar gêr ! !

Per

A-walh 'vel-se, hirie... Keno, Jord !

Jord

Keno, Per.

(Per 'h a d'ar gêr 'n eur vransellad).

Jord

(outañ e-unan)

'Vid er stumm-mañ bepred n'en dan ket c'hoaz d'am zi

Da lakaad Jozon koz arre⁵¹ da zodi :

'H an d'ober eur gourvez da varchosi Pipi...

Ma teu al laer warnon hag eñ nevo eun troatad-fri⁵² !

(Hag eh a kuit).

II

⁵⁰ mom : tregerieg : or-bo.

⁵¹ arre = adarre.

⁵² troatad-fri : troet ger evid ger deuz ar galleg.

*Mon, gwreg Per, a deu kerkent deuz he zi, 'n bleo mantret*⁵³.

Mon

(outi heh-unan 'n eur ouela).

Na, gwas a planedenn ! O Doue benniget !
D'ar plah paour e tegouez eur mezhvier da bried ?
'Deus 'med displejadur ! anken ! poan ha glahar !
Hirvoud ha nehamant 'tre vez war an douar !...
Bountet ha divountet ! sklapet er-mêz he zi !
He buhez penn-da-benn 'zo eur verzerenti !
Ger ebed da ranna ! pa 'n em gav an Aotrou,
Pe pa vez droug ennañ e tap krabanajou !
C'hoaz 'vez drastet dezi he ziegez gantañ ;
Gwasoh eo eun den mezo 'vid n'en-de eur hi-klañv !
N'eus nemedon gantañ : (Perin 'mañ ket er gêr ;
Eet e' da di on zud, gand he breur da Dreger) ;
Ha pa ven ma-unan e rankan gouzañvi,
Gwasoh evid biskoaz, kounnar ma fried kri' !...
O Doue ! pa zoñjan em amzer dremenet ?
Pebez disheñvelez abaoe on dimezet !

(Hag e ouel da vad).

Da genta 'raog ma oa 'n em daolet d'ar boeson,
Per 'oa eun den reizet, a garen em halon !
O ! na pegen evruz ! om-ni bet er heit-se !
'Vezer ket kalz evrusoh en baradoz Doue ! !
Hag abaoe m'eo troet, eur pennad 'zo dreist-oll,
'Om 'vel en eun ivern ! war an tre dond da goll !
Peurfriket e-neus din ma zammig peadra !
Moarvad e rankin mond eun deiz da glask bara ?
E-unan e kastiz hag e tiseh bemde',
Hag eo ar boeson kreñv 'zo pennabeg da ze :
Gwin-ardant ! dour-tan flamm ! pebez ano garo !
Anvet "dour a-vuhez" hag eñ "dour-varo" !
Ya ! gwir dour-a-varo d'ar priedou digar !
Ha d'o zud war o leh eur vammenn a hlahar !

(Daoulina 'ra da bedi).

Gwir Doue ! ma zalver ! karget a vadelez !
Bezit truez diehan deuz ma daou vugel kêz !
Selaouit mouez eur vamm a zoug deoh trugare' !
Hag a houlenn sikour evid he bugale !
Ho kalloud a zo braz ! ha braz ho karante' !
An neb a gred ennoh ne vez kollet morse ;
Deut eta, o ! Doue ! da rei dem ho mennad.
Distroit ma fried, ha deut d'on zavetei !...
(Hag e sav 'n he sav).

III

⁵³ 'n bleo mantret : ankeniet penn-da-benn.

Per, diskabell, mezo, 'deu kerkent, droug ennañ en eur vounta 'nezi 'n eur vransellad.

Per

Hast distrei prim d'ar gêr, pe prestig me 'welo
Peseurt talvoudegez o-deus da goz kaoziou.
Ha prient din dioustu eun dra bennag d'am hoant !
Daoust m'e' torret ma skudell ne rin ket kovig moan !

Mon

(doujet)

Me 'zo prest, te 'oar mad, da ober da lavar.

Per

(reud)

Ne ra ket amañ ken pep hini 'vel a gar ?
Bete-henn 'rez da hiz ; med diwar ar mare,
Me 'lar dit e rankan kaved peoh da vale.
(Hi zistroy 'vid komz ; med eñ he harz 'n eur lared gand nerz) :
Ger ken ! ha sent ! « Peoh ha boued !
Ha bahajou mar bez red ! »

Eil pennad

Meurz ar beure, d'an eiz a viz Genver

I

*Fantig er hao ; Laou ar Briz, Jord Foll ha Per ar Floh a
deu deuz an tu dehou, tommet mad deze.*

Jord Foll
(da Laou dre zroug)

Nan e' ket se e' se ! rag peb gwech m'am gwelez
E troez din da gein : ha pa vem asamblez,
E lerez 'vez kammed gwenneg 'n ez kodellou ;
Hogen 'vin ket paeet atao gand koz kaoziou,
Prestet m'oa dit deg skoed, en ti-mañ, warlene,
Bremañ pa 'm-eus ezomm e fell din koud aneze !

Laou

Daoust a beleh an diaoul o roin dit bremañ ?
(Hag e furch 'n e hodellou).
Pa n'em-eus ket warnon eur gwenneg, pa laran.
(Daou gammed all 'trezeg ar hao).
Tapom beb a vanne ha bez dineh bepred,
Pa 'mo me roio dit, ar re-ze 'golli ket.

Jord
(Fuloret)

Terri 'rez din ma fenn, gand eur seurt digare',
Ha koll 'ran ma skiant, nêt diwar ar maro.
(Hag e krog 'n e golier).
A-grenn on skuiz, te 'oar, o kleved kaoziou brao :
(Hija 'ra anezañ).
Na zoñj ket en em denn ker koulz marhad atao,
Ma arhant din dioustu, dre ar stumm a giri ;
Pe me 'h a war an tomm da hweza dit da fri.

Laou

Gwell e' dit 'refuz⁵⁴ ket, pe 'wel 'ben emberr,
Ar pez po gonezet o skei eur huzulier.

Jord
(a-bouez-penn, 'n eur strobigelled⁵⁵ Laou).
Daoust ha me 'ra mil foud deuz koz kuzulierien,
N'hellont ket gouest da baea an disterra skodenn.
(Hag e sko).

⁵⁴ refuz : galleg. nahfes.

⁵⁵ strobigelled : bounta.

Fantig
(*struïllet*⁵⁶)

Paouez, Jord ; na sko ket.

Per
(*'n eur harz aneze*)

Ar skei 'zo divennet.
(*Laou 'n em zivenn, med Jord a sko bepred*).
Ma arhant ! ma arhant !...

Laou
(*o skei ivez*)
Biken, lankon daonet.
(*Hag en em gannont deuz o gwasa*).

Fantig
(*'n eur hopal*)

Pipi kêz, 'n an' Doue, hast buan dond amañ.

Pipi
(*o tond prim-ha-prim*)

Petra 'zo ?

Fantig
(*o tiskwel*)

Jord ha Laou 'zo krog d'en em gannañ.

Pipi
(*o lammed gand Jord*)

Ehan bremañ, Jord Foll, na sko ket ken war Laou.

Jord
(*er-mêz ennañ e-unan*)

Nann, bremañ, mihieg, 'po memez tra ho-taou.
(*Hag e strobigell an eil gand egile. Fantig a lamp spontet da di Jozon*).

Per
(*da Jord, 'n eur harz anezañ*).

Trelatet nêt out, Jord.

Jord
(*euzuz*)

Na stok ket ennon ken.

Pe 'rin dit evelte.
(*An daou all 'harz an taoliou*).
Ne ran foeltr a zen.

⁵⁶ struïllet : aon enni.

III

*Mon hag he merh Perin 'deu kerkent deuz o zi ha Jozon
deuz e hini.*

Jozou

('n eur zond a-daol gand Fantig)

Petra 'zo nevez adarre en toull-mañ ?
Ma reer ker gwaz dizurz ha todion ennañ.

(Da Jord)

Te, Jord, 'zo adarre pennabeg d'eur seurt trouz.

Jord

(dre zroug)

N'eus forz deoh, ha me ra mil foud deuz tud tañgnous.
Rag boeserien goz n'int evid eva ken,
Hag glefe kaoud mez o lared mann da zen.

Jozon

(gand nerz)

A gle komz, er hontrol ; ha te, ma vijes fur,
A raje evelte, den laosk ha dinatur.
Distrei deuz hanter-hent 'zo kalz gwelloh, Jord Foll,
Eged m'eo en em lezel eveldout dond da goll,
Te 'vad, eo a gleje peurfonta gand ar vez,
Rag abaoe eun tamm 'zo n'ouzez ket petra 'rez :
M'az-pije bet sentet deuz ma aliou mad,
Ne vijes ket hirie e-barz en ken trist stad,
D'az tanvez, paotr yaouank, 'vijes perhenn bepred.
Ha lakaet c'hoaz warnañ, ma karjes, deuz eur red,
'Leh bremañ pa 'peus ken na danvez nag arhant,
E kollez war o lerh da benn ha da skiant.
Me 'wel zo daou vloaz 'zo n'az-peus greet taol-labour,
Ha te eur hereour mad ha fur diwar an dour⁵⁷,
Tennet 'peus da arhant, oll, deuz ti an noter,
Peurlipet int pell 'zo diner evid diner :
Ma rankan dre druez da vaga 'barz em zi,
Ha c'hoaz e tisprizez ahanon 'vel eur hi.
Bet on mad ez keñver, dre ma oan 'barz eur zell,
'Tilehes a boeson 'vid heuill eur vuhez well ;
'Vel 'peus touet kant gwech ! med bremañ 'welan mad,
E talhez er hontrol dond bemdez war wasaad :
Ma ! gre 'ta deuz da benn ! ha kerz leh ma kiri.
Pa out ken divergont ! pa ne gerez senti.
Divenn 'ran dit 'vid mad, e-barz en eur ger krenn,
Da lakaad ken da dreid 'barz em zi ken biken.
Ma ne zistroez nêt ! ha ma n'ez raktal,
War-eeun, heb krozmoli, da labourad d'ar stal.

⁵⁷ diwar an dour : ?

Jord

(pleget e benn o vond kuit)

Me 'zento, pa e' red !... Keno 'ta, Per.

Jozon

(‘droh e gomz gand nerz)

Lez Per...

A zo kerkoulz ha te e leh e-barz er gêr ;
Rag ma ne zistro prest, 'vel 'm-eus bet laret c'hoaz,
A-raog eur bloaz amañ 'zo, siwaz ! eun den poaz.
(Jord kuit)

Per

Ha se 'zell ahanout ?

Jozon

Ne ra ket da ! 'vid gwir ;

Med peb den eeun, Per kêz, 'gle lared stard e hir⁵⁸,
Ar wirionez distak !... dreist-oll, kleo mad, ar re,
'Deus greet 'veldon dilez !ha touet war ol le,
Kazoud an oll voeson en tro-pad o buhur.
Ober dezañ dre oll, eru brezel didruez,
Gwinko neb a garo ! a laran ivez c'hoaz,
Ez eo eun dismegañs da eun den 'vel Laou-Vraz.
Chom keid da sklankenni war ar zun, 'pad ar bloa'
Da ober skodennou ; da beurlipad e loa.
Pa 'mañ e dud er gêr, oll en displijadur,
'Ra deze dre e vuhez diboell ha divuzur,
(‘N eur zevel e zivreh)
Berniet a hle dre-oll !... Greet gaou deuz tud e vro.
A haloup war e lerh, malloziou 'no geno'.
Bete din ma-unan 'rank tri re voutou ler.

Laou

(‘droh e gomz)

A-walh ! na lar ket ken !... Keno ! me 'h a d'ar gêr.
(Hag eh a kuit).

Jozon

(dezañ)

Kee 'ta ! ha chom neuze ! ma vijes 'benn bremañ,
P'oas ket bet na klevet da skas⁵⁹ 'barz en toull-mañ.
(D'an ostizien)
Deoh-hu eo ker gwaz all derhel ostaleri,
Da rei bodenn bemdez d'an droug ! ! d'ar vezventi.
Klotennou dishengall⁶⁰ n'int mad da vaga
Dizurz ! trouz ha trubuill ! ha bosenn 'pad ar bloa'.

⁵⁸ e hir : e her.

⁵⁹ skas : ? da afer.

⁶⁰ Klotennou dishengall : taverniou flêriuz.

‘Barz en oll walleuriou ‘reer diwar boeson kreñv,
An neb ‘ro re outañ ‘zo ker kablu hag eñ :
Kont o-devo da renta abred pe ziwezad,
Da Zoue ha d’ar bed deuz an heveleb stad.
(Hag eh a ‘vid mond kuit).

IV

*‘Med pa gleo Mon o komz e chom d’he selaou. Er memez
amzer ivez ‘n em gav Erwan en soudard, serjant, deuz an tu
dehou. O weled ar c’hoari e chom souezet, hag eh a sioul da
gaoud Perin, estlammet oll ouz e weled erru ; med eñ he
harz da gomz ‘n eur vousc’hoarzin. Geizou ententabl).*

Mon

Gwir a lerez ! Jozon !... A-viskoaz ‘m-eus laret
N’e’ ket red kaoud boeson ‘vid beva war ar bed.
Hag eur vez eo gweled e chomfe ‘n eur gwall stad
Tud yah ha divahagn a ouestl da labourad.

Per

(o hoapaad !)

Harp e gaoz da Jozon dre da zon vrao ha kaer,
‘Ouzon dre an eñvor gwelloc’h ‘vid ma “fater”⁶¹
(Hag e tro ‘vid mond kuit, e zaouarn war e benn).
Piou na zeskfe ket ? dre forz kleved bemdez.
(med ‘vel ma wel Erwan ‘tal Perin e chom souezet mik).

Erwan

(‘n eur vousc’hoarzin).

Ohola ! ma zud vad ! petra ‘zo a-nevez ?

Jozon

(‘n eur zistrei prim).

Te ‘zo aze, kanfard !... Mezaon n’am herez mui,
Pa chomez gand Perin ‘raog dond da bokad din.
(‘N em bokad a reont).

Erwan

Me ‘gar kement hini a gerz dre an hent mad.
Ha truez deuz an neb a zo en eur wall-stad.
Ma brasa plijadur ‘ve gweled eun devez,
Kement a zo amañ evruz oll asamblez.
(Hag e ro an dorn deze oll).

Jozon

Ma bennoz ! mab karet ! ma brasa stad er bed,
Med penaoz, o ! Erwan ! out serjant ken abred ?

Erwan

⁶¹ ma “fater” : ar bedenn “Pater noster...”

O heuill eeun penn-da-benn an oll aliou mad.
Hag ar huzuliou fur 'peus roet din, ma zad.

Jozon

Neuze ne evez ket ?

Erwan

Biken diwar alkol.
Pa ne evan takenn ne vin gwelet diroll.

Per

(piket)

Penaoz 'ta 'peus gallet glebia da haloñso' ?

Erwan

Deut on d'ar gêr 'vid se ; 'benn emberr c'hwi ouezo !
An nozvez a lakaan ; deut oll ma welfot sklêr,
Penaoz 'heller heptañ beza lemm ha seder.

Per

Hag eh efom, m'hen tou ! petra 'lerez, Pipi ?

Pipi

E vo or brasa stad moned d'hen didui.

Jozon

Greet an taol ! ha deut oll ! d'am gweled 'benn emberr !
Da halonnsou, Erwan, ne vint biken re ger !
(Per kuit gand e verh).

Erwan

(‘raog mond kuit gand e dad)

Eur miz leun 'm-eus da chom, hag er heit-se, ma zud,
Gand c'hoantegez ha poell 'vez greet meur a vurzud !
(Hag eh a kuit).

Mon

(‘N eur vond kuit, he sellou en neñv).

Or Zalver d'az selaou ! ha ra vi benniget !
Mar gellez dond a-benn da zistrei ma fried.

Pipi

(‘N eur vond kuit gand Fantig).

Ma'z-pije sentet din, 'oa ar stal-mañ d'an traoñ ?

Fantig

(penneg)

Hag evel ne rin ket, nde ri ket c'hoaz he haoñ⁶² ?

⁶² he haoñ : he hañv (he maro).

Pipi

(e vreh astennet dreist penn e wreg)

« An hini 'zent ket dezu ar stur !

Deuz ar garreg e raio sur ! ! »

(Oll kuit)

Trede pennad

Eiz deiz goude : Meurz ar beure, d'ar 15 a viz Genver 1901

I

Per e-unan ; e wreg war e lerh ouz her gedal heb ma ouezo.

Per

(O tond, e zorn war e dal).

Eiz deiz 'zo deuz boeson n'em-eus ket evet takenn.
Ma kavan gwall deñval ha gwall pounner ma fenn !
Gwech a vez e welan traou euzuz hag iskiz !
'Gasfen kuit 'n eur eva adarre war ma hiz :
Mil boan e-mo o tond a-daol d'hen dilezel !
Med ober 'rin, m'hen tou ! na pa rankfen mervel !
Evid deuz boeson kreñv, er heit 'm-eus da veva,
Pa ven ker gwasket all, ne deuan da eva !...
Sklêr 'mañ ar wirionez gand Erwan hag e dad :
An den kêz e-unan 'zo kirieg d'e wall-stad !
Da lar-se, ar boeson 'lak dizurz spont dre oll !
Neb en em ro dezañ n'en-deus 'med koll war goll !
Hag enebour brasa an den en on amzer,
Ez eo ar vezventi ! an dra-ze a zo sklêr !
Deuz outañ an den kêz a ra gaou deuz eur penn⁶³,
Glahari 'ra e dud ! ha diskar 'ra e ouenn ;
Hag ar butun redet dre oll en gwad an den,
'Gouez war e vugale na chomont ket da ren⁶⁴ !
Ar re 'chom vez dister, mahagnet pe distumm,
Hag ar stad a gendalh da ren a rumm da rumm !...
Ouspoenn eo pennabeg d'ar fallentez er bed :
Diwarnañ 'reer bemdez taolfedou braz-meurbed !
Ar gwad hag an empenn a dro gand gwin-ardant
Ma vezer oll diwarnañ droug, sod ha diskiant !
Eur rivin 'vid pep ti ! eun dismantr 'vid pep bro !
Setu d'ar vezventi ar stad kriz ha garo !
Hag evdi kement-se an dud 'n em ro dezi
'Vel pa ve eun enor deze dond d'en em vezvi !
Daoust penaoz an daoned en em denn ahane ?
Prest on da goll ma fenn pa zoñjan kement-se !...
An dud, eme Erwan, 'zo c'hoaz en dallente' ;
An eil a glask gonid deuz sotij⁶⁵ egile :
Kredi 'walh a rafen ; rag ar hiziou sota,
Hag ar muiañ diroll a blij deze ar gwella...
Red eo anzaou 'velkent 'mem nebeud a skiant,
Pa n'hellom dond a-benn demeuz ar gwin-ardant ?

⁶³ deuz eur penn : dezañ e-unan.

⁶⁴ da ren : da veva.

⁶⁵ sotij : sottoni.

Eun dra ne ra ‘med droug ha gaou war ar bed-mañ,
Ha memestra e talhom da eva deuzoutañ !...
Breiziz koz koulskoude a oa pennou kaled !
Biskoaz gand enebour ne oent bet diskaret !
Hag e lezfom hirie alkol louz d’on zrehi !
Malloz ! d’ar gwin-ardant ! malloz d’ar vezventi !
(*‘N eur vond war skwellfaad⁶⁶*)
Red ‘vo din d’ar boeson dond da stigma eur pech,
Hag unan all d’an den pa n’e’ ket ‘vid e dech !
Rag tra vo boeson louz ! an dud en em vezvo !..
‘H an c’hoaz da gaoud Jozon da houd petra laro !...
(*Hag eh a ‘vid mond da di Jozon*).
(*Med Mon, en ged, a harz anezañ, a grog en e vreh gand
douster ‘n eur lared :*)

Mon

Deus d’ar gêr ! lez Jozon ken a vo eur wech all !
Laret mad en-doa dit e-pije da ziwall
Da gollches da voeson : divennet n’eo diwit⁶⁷
Kemer re a drubuill pa vije o vond kuit (!)
Lez da zoñjezoniou, ha diskuiz da hortoz !
Pe ‘ri ‘med alteri adarre ‘pad an noz !

Per

(*‘n eur vond ganti*)

Hirie ‘sentin ouzit ; se ‘welfom eur wech all !
Rag vo ket lezet ken an den war an hent fall ?
Ma ne vez ket lakaet dond war an hini mad ;
Ar bed a gendalho bepred dond war wasaad !
(*Hag e hast mond d’ar gêr*).

Mon

(*er penn, a zistro da lared*)

Trugarez ! ma Doue, demeurez a galon vad !...
Ma bennoz ! da Erwan ha da Jozon e dad !
(*Oll kuit*)

⁶⁶ skwellfaad : buhezakaad.

⁶⁷ diwit : ?

Pevare pennad

D'ar zadorn da noz 19 Genver

I

Jord Foll 'deus deuz an tu dehou, hag a gomz outañ e-unan, skwelfet⁶⁸

Me, douja pe senti ! adkregi a-neve'
Evel Yann da graonwa⁶⁹ (!) em labour adarre !
Nann, biken ne blegan, gwell 've ganen terri,
Modn kentoh da Gayen pe d'ar Heldoni.
Bet on krog tri devez : o ! daonet ! gwasas reuz,
Ar hren em izili, poan benn,an tan em hleuz !
Eet on re hir, red eo din kaoud boeson 'benn beva,
Pe 'vel eur zah goullo ne chomin ket em za',
Gwin-ardant, pe soei⁷⁰, med a beleh em-mo ?
Foletr gwenneg ebed ken, ha dre oll skodenno' !
Kuitaet 'm-eus ti Jozon abaoe eiz deiz 'zo ;
Med ar bern mignoned am-oa er vro tro-dro,
A dro kein din bremañ hag a gemer an teh,
Raktal ma ven gwelet o tispak war al leh.
A-raog braz ha bihan 'ree al lez da Jord Foll.
Dre leh ma tremenen e oan deut mad d'an oll ;
Bremañ eh on eun estlamm ker gwaz hag eur hi-klañv,
'Chomin ket da veva er stumm-ze, pa laran.
Per, ma brasa mignon, 'zo soetet din⁷¹ ive',
Abaoe na ev ket ken 'mañ klañv war e wele :
'H on o tond digantañ ; ne ran 'med alteri.
A-greiz 'ven e Bro-Zaoz en em gav en Turki (!)
Ne gaoze 'med alkohol, gwin-ardant, kognag, rom,
Mann deuz den, sklêr emañ gand an deleriom.
O senti deuz Jozon hag Erwan e vab sod,
'N-eus tapet en eru wech, ma mignon Per e lod.
Med n'e' ket se ez e', an noz , Jord, a dosta,
Ha n'ouzez ket peleh mond c'hoaz da houl' loja :
Evid da di, Jozon, n'in biken war ma hiz,
En ti Pipi, me 'gred, 'mo eru gwele diviz⁷² ;
Ar braz deuz ma arhant 'zo eet en godell e wreg ;
Mar kouezfen war e yalh ne rafe ket daou bleg.
Pa 'm-oa 'reen ket a forz, ha bete kent n'on bet
Nemed eur genaoueg, eur hêzig war ar bed :
N'vo ket kont 'vel-se ken, ha bremañ on er zell
Da 'n em zigoll en groz⁷³, m'hen tou, heb dale pell.

⁶⁸ skwelfet : dianket.

⁶⁹ da graonwa : ? "da adkemer" ?

⁷⁰ soei : ? "mervel".

⁷¹ 'zo soetet din : ? "a vank din ivez" ;

⁷² diviz : êz em-mo eur gwele.

⁷³ en groz : galleg : dre vraz.

Da hortoz bezom sioul ; rag n'e' ket o hopal,
'Taper gedon spontig 've dalhmad o tiwall.
(*Kleved 'ra trouz en tu dehou*).
Oho ! piou deu aze ?...
(*Hag e souz war an tu kleiz, daou-bleget*).

II

*Yann gêz hag e wreg a erru d'ar haloup, mezo mad, hi krog en
lost e chupenn.*

Katel

Ro da arhant amañ !

Yann

(*'n eur zistrei*)

Biken gwenneg n'az-po deuz ma ferz, pa laran,
Kaer 'mez derhel da rei 'ne⁷⁴ pe kammed a-walh ;
Bremañ ivez d'am zro me 'zalho mad d'ar yalh,
Ha deus ket war ma lerh, pe 'vi pe 'tapi taoliou pao.

Katell

Na zoñj ket ma sponta gand da gaoziou, loen brao,
Me 'raio dit hala, pe vi kon't⁷⁵ pe vi ket.
(Hag e vount he dron 'n e hodell).

Yann

(*'n eur en em zivenn*)

Neuze 'vo tomm ar yod, pezh fall hag ifrontet !

Katell

(*a ziframm an arhant digantañ*)

Mar stlabezom oll war al leh : sacha ha dizacha,
Bounta ha divounta a ra an eil d'egile o klask tapoud
An arhant, kement ha ker bihan ma kouezont peg-ha-peg.
(*Jord a deu a dap an arhant hag ah a 'vid mond kuit 'n eur
lared :*)

Jord

Peb droug a dalv eur vad bennag, en gwirione' :
Gand ar re-mañ 'hlebjin ma lañchenn adarre,
Hag e kavin lojeiz en tu bennaket all.
(*Hag e trid gand stad*).
Dre oll eo poaz ar gwir gand ar gaou hag ar fall.
(*Med kerKent e kleo trouz en ti Per hag a deu war e giz ; an
trouz 'h a war wasaad, ha Mon hag he merh, krog en dorn
eur paotrig a deu a)zous en eur euzi, en o bleo, spontet ha
fuloret oll, Jord en em vount en stal Per, leh e hourvez. Per,
eru vaz-yod 'n e zorn, a deu war-lerh gand geiziou spontuz,
'n eur hija e vaz da vad. Priedou ha Yann gêz a zivad 'n*

⁷⁴ 'ne : aneze.

⁷⁵ kon't : kontant.

*oed*⁷⁶ ; *Jozn hag Erwan a strink deuz o zi ; Pipi ha Fantig deuz o hini.*)

III

An oll war ar lez, spontet, geiziu doareabl hag ententabl.

Mon

(o haloupad d'an tu kleiz gand he bugale)

O ! Doue !, ma Doue !, buan tud d'on zikour !

Per

(euzuz)

Gwalleur da dud ar bed, pisoriet⁷⁷ eo an dour,
Dre oll ar mammennou, al lentchou⁷⁸, ar steriou,
Bete memez ar glao a gouez deuz an neñvou,
'Zo troet en alkohol, kaer zo beza nehet,
'Ranker eva oute 'benn terri ar zehed.
« Klask a rit ? Beza 'po ! », en-deus laret gand stad,
Paolig koz, an diaoul, prest atao d'ober vad.

(Hag e c'hoarz skrijuz)

Netra n'eus gallet c'hoaz dond deuz an dud a-benn
Na dismantr ! na brezel ! na kernez ! na bosenn !
« Me zoetin ket warne ! 'n-eus laret an alkohol ;
Me ray deze mond d'an traoñ ! o beurkaso da goll !
Eur wech 'vin 'n em vountet, gwriziennet 'n o gwad,
'Barz tri-hant vloaz goude emañ ar bed a-blad ! ! ! »

(Hag e sko en-dro dezañ).

C'hwi 'vo kirieg da ze, diaoulou an ivern ?
A zalh da darnijal en-dro din a vil vern !

*(Stlapoud a ra kuit ar vaz-yod hag e saill war ar mouch-
goulou 'zo gand Jozon, a ziframm digantañ ma lavar en eur
hija anezañ da vad).*

Peleh emañ Jozon, ar prezegenner kaer ?
'Zo barreg, emezañ, da zistrei peb mezvier !
Gaouiad koz 'zo 'nezañ ? Me eo eñ an hini,
A deuy a-benn bremañ demeuz ae vezventi !
Maro eo an tonton 'm-oa en Amerik ;
E oll vadou 'zo din ; bremañ on pinvidig !
Gand ar milionou e-neus lezet ganen,
Me harzo da noazoud an oll voesoniu kreñv ;
Rag gante me breno kement ostaleri,
'Beurzuillin dre an tan a hini da hini !...

(Geiziu)

Gand ar pezh a chomo 'lakin ober dioustu
Eur podhouarn braz-braz ! 'rin dindannañ tan ru' !
Hag e-barz da rosta en eru bern 'vo stlapet !

⁷⁶ a zivad 'n oed : a zeu en-dro en o empenn.

⁷⁷ pisoriet : ampoezonet.

⁷⁸ lentchou : ar gwerniu.

Kement en em vesko d'ober alkohol daonet !!
(Ober 'ra van da stlapoud tud hag e laosk e vouch, an hini a dap Erwan dioustu ; neuze e sko gand e zaou zorn serret en-dro dezañ).

D'an oll droug-sperejou 'vo torret nêd o fenn !
Mar kendalhont da zond war ar vro evel-henn !...
(Med skuiz deuz ker gwaz reuz, e kouez semplet ! War urz Jozon, Erwan ha Pipi her has d'e di ; e dud 'h a war-lerh 'n eur ouela ; Mon, 'zistro da lared da Jozon :)

Mon

O ! Doue ! pebez stad ! penaoz 'vo diwallet ?

Jozon

Ni 'yelo a beb eil d'ho ti ; bezit divorhet i
(Hag e tistro 'vid mond d'e di ; med o weled ar priejou Yann-Gêz, eh a diraze, hag e lar deze, ankeniet) :
Gwelit pebez skweriou 'zo dirazoh bemde' !
Gwalleuriou spont ! ha c'hoaz furraet tamm 'vid se !

Yann

Me 'zo prest da zistrei ha dond da zilezel,
Kement takenn voeson gand ma raio Katell.

Katell

Ro peoh ! kildroenner, gand da goz kaoziou vên,
'Glee resisaad da genta 'raog lared mann da zen !
(Hag eh a 'vid mond kuit).

Yann

Te ne zivezvez ket bemdez tro pad ar zun ?
Me vez 'med deiz ar pae !

Katell

(a zistro)

Ha bep sul ha beb lun !

Yann

(dre zroug)

'Werzan ket ma dillad, 'velkent, da gaoud boeson,
'Vel e rez aliez, mamm laosk ha digalon !
(Hi 'zerr he daouarn hag a skrign he dent).
Goude ma honezan bremañ eur skoed bemdez,
Ez om dre da gondou er vrasa paourentez ;
Hag on daou vugelig 'rank tremen aliez,
Pa vezez krog da rouli, deuz peb magadurez !
(Pipi hag Erwan a deu war o hiz. Hi 'h a kuit 'n eur dartouillad⁷⁹).

⁷⁹ dartouillad : skrigna an dent.

Jozon

(da Fañch, e zorn war e skoaz)

Ar gaou 'zo deuz ar wreg a 'n em daol d'ar boeson !
An ozah 'gle 'vid se chom war an hent gwirion ;
'Benn rei skwer ha kuzul e rank kaoud dalh 'n e benn,
A-benn harz e bried d'en em rei d'ar werenn...
Gwalleur ! Yann-Gêz, d'an neb en em laosk re da vond,
Rag tro-pe-dro, siwaz ! e kavont fall o hont.

Yann

(o vond kuit)

Konta kaoziou 'zo brao ! med allaz !ne meum ket
Nag ar memez poellder, nag ar memez spered !
Me 'daolo pled bremañ : kenavo ar henta.
(Hag e red kuit)

Jozon

('N eur vond ivez d'e di, war-lerh ar re all).

Daoust pegoulz 'vo kompez an traou war ar bed-mañ ?

Jord Foll

(o tond deuz stal Per)

Birviken ! diod koz, vel ma 'mañ 'rank chom :
Pep stad 'zo red da gaoud 'benn derhel 'nezi 'n he flomm !
(Hag e red kuit dre an tu dehou. Oll kuit).

Pemped pennad

Eiz deiz goude, sul ar beure, 27 a viz Genver 1901

I

*Eur Mevel kouër a deu e-unan deuz an tu dehou,
hag a gomz*

Bet on er presbital kerkoulz hag en Ti-Kêr,
Bet o kaoud ar zakrist, an touller⁸⁰, at hloher ;
Foeltr takenn en neb leh, eo, feiz, en ti Jog ‘oan,
‘A raio, emezañ, an daou arched buan).
Eir banne koz dour-jistr⁸¹, flakoh ‘vid piketez,
Lakefe d’an diaoul e gorr da zond war-vêz⁸²,
Foeltr-gar n’an ‘mêz a gêr ‘nez ar gêr ‘nez kemer hini kreñv
Da gas ar vlaz d’an traoñ, da laza mik ar preñv,
En ti Fantig-Pipi ‘z eus hini mad-kenañ :
Gwelom hag-eñ ‘zo gouest d’ober ‘vel a laran.
(Hag e sko war an daol).

II

*Fantig a deu kerkent ; penn Pipi en nor
(At houër ‘daol e zaou wenneg)*

Fantig
(dezañ)

Petra ‘vo lakaet deoh ?

Ar Houër
(klemmuz)

Gwin-ardant, Itron vad,
Ne ray ket din a zroug goude gwall galonad.
(Fantig a ziskenn)

Pipi
(deu ivez, kuriuz)

Daoust ha c’hwi ‘vefe deut da zegas gwall-gelou ?

Ar Houër
(truezuz)

Laou-Vraz hag e bried ‘zo ‘n em lazet o-daou.

Fantig
(spouronet oll)

⁸⁰ an touller : an hini a ra an toullou evid ar beziou.

⁸¹ dour-jistr : pa ne deve ken jistr digand ar mouded, e veze lakaet hennez e-barz eur veol. Dishreet e veze ar mouded, ha lakaet dour e-barz. Neuze, gand ar vugale, e veze mesket an dour hag an avalou. (Greet em-oa pa oan yaouank !). Neuze e veze adlakaet war ar presour. Hag e teue “dour-jistr”, a veze roet d’ar re a oa o vond dalabourad er parkou !

⁸² e gorr da zond war-vêz : a rofe droug-kov d’an diaoul.

Penaoz ?... ‘vefent maro, Marijan ha Laou-Vraz.

Ar Houër

(truezuz)

Gand eur helou ker kriz on amañ feteiz-paz⁸³.

Fantig

(d’he gwaz, strafuillet).

Red buan da di Jozon ! ma ‘h a da gerhed Mon.

(D’ar houër)

Daleit, me ho ped !

(O vond)

Prima⁸⁴ ‘ra ma halon !

(Pipi lamm en ti Jozon ha Fantig en ti Per).

Ar houër

(e-unan)

Maro Laou a lako an oll d’ober kaoz ker !

Dre ar bern skodennou ‘lez war e lersh en kêr :

E-barz er sort din-me ‘fizied ket daou wenneg !

Med Laou a-raog mond kuit ‘dab meur a bladeneg !

(Geziou fentuz).

Eur wech ‘vo leun ar skudell ha lipet ar zah kerh !

Keno ! ha d’ar bed all ! deut bremañ war ma lersh !

Vad a ra kaoud eur re da yenna paotred kêr !

A zo kalz re lorchuz en-keñver Pipi-Kouër.

Flemmet out ?... Flemm ivez ! hag e viot kitez !

Evom hemañ bepred : me ‘zo ma laz er-mêz !

(Hag eh ev e vanne).

III

Kerkent Mon a deu gand Fantig ha Jozon gand Pipi.

Erwan, o tiwall Per, a zispak e benn en korn an tu dehou.

Mon

(gand mall)

Petra, ma Doue, ‘zo ?...

Fantig

(o tiskouez ar houër)

Kelou spont ha garo !

Priejou Laou ar Briz a zo bet kavet maro !

(Mon a ra sin ar groaz ‘n eur Jezuzal).

Jozon

(d’ar houër)

Penaoz ? kavet maro ! ken buan all o-daou ?

⁸³ feteiz-paz : paz : ?

⁸⁴ Prima : skrija.

Ar houër

Hi, 'baoe deh da noz deuz ar groug en eur hraou !
Merket 'oa an oll dreo⁸⁵ e-barz eun tamm a oa.
Hag hirie dre urcher 'oa ar werz diweza.

Jozon

Klañv moarvad o weled ar vuhez 'ree he gwaz,`
Ez eo peurgouezet en dizesper, siwaz !

Mon

Doue d'he fardono !... Kredabl, ar plahig kêz !
Deus ket gellet gouzañv koueza en dienez !

Fantig

Piou 'n he leh a raje ? pinvidig 'vel m'eo bet !

Jozon

Na gomz ket evel-se ! dizesperi 'dalv ket !...
(D'ar houër)
Ha Laou ?

Ar houër

Kaset 'oa prim at helou gand fourgas
Da Laou, 'oa o roul en krozhent ar Peurgas :
Divati 'reas 'velkent pa glevas ar helo' ;
Ma tehas 'vel eun tenn, 'n e zremm liou ar maro !
Hag hirie 'vel 'oa deiz 'oa kavet 'tal e di,
War e benn en eur poull ! reud-mad e izili ! ! !...

Mon

(oh euzi, juntret he daouarn)

Doue, pebez dismantr, ha peger gwaz enkreuz,
D'o herent, ha dreist-oll, d'o bugaligou kêz.
(Hag e ped)

Jozon

(gand euz).

O-daou war ar varvskaoñ... Me 'lar ar vezventi,
'Zo barreg da lakaad ar vein d'en em zebri.

Mon

'N em lazet, eet da baour.

Fantig

Ha d'ar bern skodenno'
'N-eus lezet Laou dre oll, daoust piou a zamanto ?

Erwan

⁸⁵ Merket 'oa an oll dreo : lakaet e oa an oll draou evid beza gwerzet.

(deu ivez)

Ha daoust petra 'zoñjo Jord Foll war gement-mañ ?

Fantig

Eiz deiz 'zo 'n'eus klevet nikun komz anezañ.

Ar houër

Er Peurgas 'oa gwelet o rouli en deiz all.

Jozon

(Eur zon 'zon en kêr).

Hennez ivez, tud kêz, en-devo echu fall.

Mon

(He breh astennet 'trezeg kêr)

Klevit !...

(An oll 'chom sioul da zelaou).

IV

*Med kerkent Gward-kêr a dreuz al lez deuz a zehou da gleiz,
'n eur' hopal : d'an tan ! d'an tan !*

Perin

('deu strafuillet oll)

An tan en ti Yann gêz.

(An oll frimet)

Jozon

(e zivreh en êr).

Ar walenn peurvuiñ 'sko dre oll asamblez.

Mon

Redit oll da zikour, me 'chomo war-dro Per.

(Hag e redont oll kuit)

Pipi

(da Fantig, er horn).

Prenn an nor a-raog dond ! pe chom e-barz er gêr.

(Kuit, med Fantig 'h a d'he zi).

V

Naig Flen, matez Jozon, bouzar, 'deu kerkent 'n eur lared :

Naig

(burzuduz)

Jord 'ra 'med fuketel er beure-mañ dre amañ,

Red mad eo din gweled o klask petra emañ :

'Vid her gedal gwelloh 'm-eus prenet dor ar ru,

Deut amañ dre a-dreg.

(Hag e sell. Med setu-eñ erru. Hag eh a da guz en stal Per).

VI

Jord Foll a zaill deuz an tu kleiz, distronket, spontuz, 'n eur vrañsellad e vreh ; med kerkent e pleg d'an douar hag eh a war e barlochou d'ar penn all d'an daol.

Fantig

(o tond war he hiz, alhwez he dor 'n he dorn).

'Vid me rank mond ivez da zikour laha an tan,
Ne chomin ket amañ 'vel eur maout ma-unan.

Jord

(o sevel 'vel eun tenn)

War da nañ, Fantig koant, 'dalv ket mond ker buan.

Fantig

(oh euzi gand ar spont)

Petra 'glaskez amañ, d'ar houlz-mañ da-unan ?
Teh kuit, pe me 'hopo.

Jord

(gand eur c'hoarz euzuz)

Penaoz n'am harez mui.
Koulskoude n'eus ket pell e rees picherou din⁸⁶..
War digarez on paour, se ne ra mann d'am stad.
Ha chomet on bepred Jord Foll pennkil-ha-troad.
(Hag eh a 'vid pokad dezi).

Fantig

(oh en em ziframma gand euz)

Na stok ket, 'laran dit.
(Prim 'vel an avel, Jord a dab he fenn en-kreiz 'tre e zorn kleiz hag e gorr ; gand e zorn dehou e tispak eur fistolenn a viz warni, 'n eur lared gand nerz :)

Jord

Peoh dioustu, Fantig koant,

N'e' ket pokou 'glaskan, me 'fell din ma arhant.
Ma lerez eur ger ken ez out eur plah varo !
Godiserez treitour ! hudur ha divalo !
Yalhad arhant Laou-Vraz a fell din kaoud ivez !
N'e' ket muih dit-te evid ma'h e' din-me !
(Hi a gouez semplet, hag a eren anezañ gand eul las).
Ha bez sioul ma kerez, mar 'peus c'hoant da chom beo !
Ma fiñvez alese !... d'ar bed all ! ! ha te gleo ?

⁸⁶ e rees picherou din : e kares ahanon.

(Hija 'ra anezi gand e droad hag eh a d'an ti. Erru e toull an nor e tistro da lared) :

O laerez al laeron n'eus tamm pehed ebed !
Pep hini d'e dro 'ta ? pa 'mañ 'vel-se ar bed ! !

(Hag eh a 'barz an ti).

(Kerkent Naig a zifoup frue satl Per, a hast dizeren Fantig 'n eur hija nezi da vad ; divuni 'ra hag e redont kuit strafuillet dre an tu kleiz.)

VII

Prestig Jozon 'deu dre an tu dehou 'vid mond d'ar gêr bet o sikour laha an tan ; med Mon, kuriuz, a deu war e lerh.

Mon

C'hwi 'zo distro, Jozon !... Penaoz e' bet eet kont ?

Jozon

(o tistrei)

Krak 'vel ma 'm-oa soñjet : eur spont ! Mon gêz ! eur spont !
Deuz lochennig Yann-Gêz n'eus bremañ 'med ludu !
Eñ, mezo-du, 'oa bountet 'barz er prizon dioustu ;
Relegou e bried peurzuillet, 'zo kavet,
Pa oa lazet en tan, a-dreuz war an oaled !
Moarvad eo bet kouezet en he zan mezo-dall,
An tan deuz he dillad 'zo kroget el leh all !
Ha c'hoaz evrusamant ! an daou vugelig kêz !
'N eur gwele, traoñ an ti, 'zo sachet beo er-mêz !

Mon

(frimet, he dorn war boull he halon).

Na gwas a gwalleuriou ! na pebez marouou kri' !
'Zalh heb ehan, bemdez, da heul ar vezventi !...

VI

Erwan ha Perin 'n em gav kerkent, peb a vugel gante. Pipi 'deuy er memez amzer, du e zillad, hag eh ay d'e di prestig goude.

Perin

('n eur bokad d'he hini)

An daou vugelig paour ! koant evel an êlez
Seder, ruz o dioujod ! desped d'ar baourentez !...
Ha lared ne oa ket eur hristen war al leh
Da 'n em garga oute ! Tud kriz 'zo, me 'lar deoh !

Mon

(d'he merh)

Hag e ri-te penaoz ? Klañv 'vel ma'z e' da dad ?

Jozon

Mon, n'he gourdrouzit ket ! greet 'deus an hini vad :
Ar mad vez digollet abred pe ziwevad :
Me 'n em gargo oute, deuz eur red, erur pennad.

Perin

(gand mall)

Nann ! nann ! Erwan ha me a zo en em ouestlet,
Da gaoud peb a hini ; 'vid hemañ n'ho-po ket !
(Hag e luskell anezañ war he divreh. Erwan, krog en dorn egile 'hoarz dindan he sao⁸⁷).

IX

(Kerkent e strink deuz dor an ostaleri Jord Foll, euzuz, beh warnañ. Pipi war e lerh krog en lost e chupenn, Jord troet e gein, strafuillet ne wel ket ar re 'zo dirazañ war al lez. Skei a ra war breh Pipi, med hemañ 'zalh krog mad bepred).

Pipi

(a hop)

Harz al laer ! harz al laer !...
(Jord, an hini⁸⁸ a zalh 'n e zorn kleiz yalhaf arhant Laou-Vraz a zispak e fistolenn gand e zorn dehou 'n eur lared :)

Jord

Ne hopi kammed ken !

Dal 'ta pa out o klask ! Setu da waz-nouenn !...
(Daou denn. Pipi a zigor e zivreh hag a gouez raed⁸⁹ war al lez. Jord 'h a 'vid kemer an teh ; An oll 'zo spouronet ha Mon 'zo prest da zempla. Jozon hag Erwan a harz Jord Foll mond kuit).

Jord

(E vistolenn en eun dorn hag ar yalh bepred en hini all, a hop) :

Ar henta stok ennon a zo eun den maro !

X

(War an tomm e teu Naig ha Fantig deuz an tu dehou gand ar Mêr hag ar gward : Fantig, spontet oll, a gouez semplet war gorv he gwaz, an oll 'zo er penn uhella deuz ar spont hag aon o-deus).

Ar Mêr

(d'ar gward, astennet e vreh 'trezeg Jord)

Krog raktal deuz ma ferz er muntret divalo !

⁸⁷ 'hoarz dindan he sao): fiha.

⁸⁸ an hini : p'hini, er skrid orin.

⁸⁹ hag a gouez raed : hag e kouez euz e zav-sonn.

(Jord a zistro prim hag a laosk daou denn warnañ : med Erwan, war e hed, a dro e vreh ker prim all, hag a lamm gantañ ; ar gward a ra ivez, ha yalh ha pistolenn a gouez d'an douar ;eren a reer anezañ prim-ha-prim. Mon, dizemplet, a zifronk. Perin, krig en daou vugel, a goach aneze gand he diouvreh hag he horv. Naig 'h a da zevel Fantig an hini⁹⁰ zivad ivez, hag o-diou eh evesaont Pipi).

Ar Mêr

(gand nerz da Jord, an hini stou e benn)

A-walh 'peus greet bermañ ! muntre laosk hag euzuz !

Gand da benn e paei da daolfedou spontuz !

Pa 'h i 'pad da vuhez pell du-hont ! d'ar galeo'

Te 'vo, n'eus forz penaoz, eun dizamm mad d'ar re veo.

(D'e ward)

'H an da skei ar helou da archerien Pmepoull,

Bountit prim anezañ da hortoz 'barz en toull !

(Hag 'h a 'vid mond kuit).

XI

Med kerkent, Per, diskabell, en korv e roched, a zispak. An oll a chom sioul.

Per

(astennet e vreh)

Gouarnerien, barnerien, 'raog dougen neb setañs,

Teurvezit selled piz en pep tu d'ar valañs ?

Rag n'e' ket mab an den 'peus hepken da damall,

Ar boeson a-raokañ 'zo pennabeg d'ar fall.

An droug 'deu deuz e berz : sellit mad en-dro deoh

Ha gwelit an dizurz a laka en peb leh :

An alkol milliget a dro hag a zistro,

En eun doare spontuz, an dud kêz en peb bro.

Tud fur diwar an dour 'vez sod-mad diwarnañ.

Ar sioulla tud en-mezo a hop kreñv peurvuiañ.

Gantañ an dud reisa 'vez ar muiañ diroll.

An dud vad ha gwirion a gas memez da goll.

Ar boeson eo d'an den mamenn an ol viñsou,

'Zalh bemdez da hweza war e falla techou,

Ma reer traou ken euzuz ! disleal ha treitour,

Ne zoñjer ket 'zo ken enne diwar an douar...

An den kêz 'zo ker zemp ma talh da heuill bepred

Ar vuhez 'vel ma 'mañ dirazañ astennet :

Hogen, hirie, c'hwi 'oar, ne vezer evid fiñval,

Anez trinka, eva, pe beza eur fall.

Ha tra ma vo ar bed dre voeson en e za,

An den val ivez d'e heul evel ma 'h a ;

Barnit 'ta da genta ar boeson milliget,

⁹⁰ an hini : p'hini, er skrid orin.

Kirieg da vil walleur en pevar horn ar bed.
(*hag e seh e dal*)
(*Pipi, harpet gand Fantig ha Naig, a zav en e goazez.*)
(*Jord a ouel da vad*).

Erwan

(*o tistana ivez*)

An den, da larez Per, a zo, siwaz ! kabluz !
Dre ma kav war e hent eur stad fall ha mezuz,
An digarez, 'ouozoh, 'lak ober ar pehed:
Diskarit ar boeson ha ne vo ket evet.
Mar deus er barrez-mañ kement a zizursiou.
Peleh 'mañ ar vammenn nemed en evachou.
Mar 'mañ war ar varvskaoñ Laou-Vraz hag e bried.
N'eus netra pennabeg 'med boeson milliget.
Ha mar deo peurzuillet gwreg Yann-Gêz hag e di,
Eo adarre, c'hwi 'oar, dre nerz ar vezventi :
A-raog, barn re bounner, pouezit war ar stad ;
Ha lakit da genta d'an den eun harz evid mad.
Rag tra ma vo lezet kerz ar bed dishual,
E rofoh tu dezañ en arroudenn ar fall.

Per

(*gand mall*)

Ya ! ya ! tra 'vo boeson e vo greet taolfedou.
'Kendalho an dizurz ! erruo gwalleuriou :
Ar gwas a enebour, d'ar paour-kêz den dre oll,
Ez eo ar boeson kreñv, lesanvet an alkol ;
Ne dalv ket displega an daolenn penn-da-benn,
Ne glever a bep tu 'med krozmol ! garm ha klemm.
'Eneb ar vezventi hag he gwall-stad skrijuz,
A gas ar bed d'an traoñ en eun doare spontuz.

Erwan

Da beleh 'sachje ken Jord da glask e arhant
Med el leh m'eo teuzet aneze en gwin-ardant ?
Boeson her has da baour ! diwar boeson e sko.
Ar had kêz dicheket a deu atao en-dro.
Jord Foll tra ma nevoa a oa kalon vad oll.
Ma 'n-eus kollet e benn ez eo dre an alkol :
Fantig o rei dezañ a oa o talbenn,
Ar pez a zo, siwaz ! erruet penn-da-benn.
Neb 'zo deuz on gouarn a zo ivez kabluz,
Pa ne lakont eun harz d'ar vezventi noazuz.
Rag ma vez diskaret dre oll ar gwin-ardant,
An dud kêz a zalhfe o fenn hag o skiant.

Per

(*gand nerz*)

Ar boeson louz d'an traoñ ! dao da vad d'an alkol.

Dao ! da beb marhadour her stlabez puill dre oll.
Louzou kreñv d'ar boan vraz ! mond distag d'ar pal krenn
Ha deuz ar stad euzuz ! e teufor prim a-benn.
Petra 'larez, Jozon ?
(*Jord Foll a zifkonk*⁹¹ *da vad* ; *Pipi 'n em nêta. Fantig a zastum yalh Laou dizumul*⁹².)

Jozon

Lared 'vo red d'an den,
'N em zikour c'hoaz da houl 'benn trei e blanedenn :
'N em rei c'hwek d'al labour ; distrei diwar ar fall ;
Nah an oll evachou 'benn beza didamall.
Pa ray peb den gouzieg d'ar boeson kreñv e gaon⁹³,
Ar stad 'h ey he-unan a gouezo prest d'an traoñ.

Per

(*stard*)

Me 'lar ne raio ket ! nemed greet e vefe,
Gand ar re on gouarn, lezennou a-neve' ;
Tra vo ker marhad-mad ar boeson ti da di,
Deufor biken a-benn dimeuz ar vezventi.
Da hortoz da drehi an oll droug a laka
Ar pardon etrezom eo c'hoaz an arm kaerra :
Neb a vez pardonet a deu prest peirvuia,
Gand gwir anaoudegez a stad d'en em reiza.
Trugarez ha doujañs 'n-ez goude da viken
Eneb a walh dezañ e behed penn-da-benn⁹⁴
Kaerra tra a ouezfe an den ober amañ
Eo pardoni d'an neb 'n-eus greet gaou deuzoutañ :
Or zalver a walhe an neb 'n-oa e lazet,
Ha ni n'om ket 'vid ober an neb 'n-eus on gloazet,
E her diweza 'oa o vervel 'vid ar bed :
« Pardonit, emezañ, hag e vezoh pardonet. »
(*Skuiz e kemer an teh, Mon war e lerh. Jord a ouel bepred*).

Pipi

(*o sevel 'vel eun tann*)

Ar wirionez 'lar Per, me 'bardon da Jord Foll,
Ne vo birviken ker feuls na ken diroll.

Fantig

(*o taoulina dirag ar Mêr*)

Ya, pardonit dezañ, m'ho ped, aotrou Mêr kêz,
Ma vez biken barnet me 'varvo gand enkreuz.

Ar Mêr

⁹¹ a zifkonk : a voug.

⁹² dizumul : e skoach.

⁹³ e gaon : e gañv.

⁹⁴ Eneb a walh dezañ e behed penn-da-benn : iskiz eo ar frazenn : Evid ar re a walh dezañ e behed penn-da-benn.

Konta kaoziou 'rit oll ; med ma harg 'zo pounner ;
Ha n'hellan ket atao, koach taolfedou 'vel Mêr.
(*Fantig a zao*).

Jozon

Eur wech n'e' ket atao, se 'gresko ho prud vad.
N'eus forz penaoz 'vo kont, ni zamanto d'ar Stad.

Pipi

(*gand mall*)

Ha neuze 'oa 'med poultr e-barz er fistolenn,
Rag en-kreiz ma skouarn em-oa tapet eun tenn.
(*Prim, ar gward a laosk eun tenn war blad al lez*).

Ar Mêr

(*o tistrei, souezet*)

Oh ober petra out ?

Ar gward

O weled ar c'hoari :

En homañ⁹⁵ 'oa 'med poultr, evel ma lar Pipi.

Ar Mêr

(*da Jord*)

Evel penn ar barrez, lakaad enni skwer-vad,
Da badoni, Jord Foll, e ve ma brasa stad,
Ma ouezfen e teufes en amzer da zoned
Da brena dre furnez an diotachaou greet.

Jord

(*ankeniet*)

Ne dalvan ket beza kristen pardonet,
Grit a gerot ouizn, me 'zo eun den kollet,
Den ne raio labour din da helloud paea,
Ar gaou hag an oll droug em-eus greet d'amnesa.

Jozon

Na gomz ket evel-se, rag du-mañ e kavi,
E-barz en peb amzer labour pezh a giri.

Ar Mêr

(*d'ar gward*)

Dizeren anezañ, m'e laoskit war e roll.

(*Da Jord*)

En amzer da zoned, bez kalz furroh, Jord Foll.

(*Jord da Bipi, da Fantig, da Jozon ha d'ar Mêr*)

Jord

⁹⁵ homañ : ar bistolenn.

(gand nerz)

Kalz re a galon vad, an eil hag egile,
'Peus en-keñver eun den didalvoud a drue' ;
Med pa'z e' d'ho mennad dond da zalvi Jord Foll,
Daoust d'e vuhez diboell, divuzur ha diroll.
Kredit e talhin deoh eur wir anaoudegez,
Dre eur vuhez nevez reizet war ar furnez,
Ha pa gar c'hoaz Jozon ma hemer en e di
E paein gand ma foan lod ma ingratiri⁹⁶ :
Dirakoh hag an neñv e touan 'n eur ger krenn,
Dond da ober dilez deus boeson da viken,
Ma gwall-reuz 'zo echu ; bet on er penn pella,
D'am honsorted direiz 'vin skwer da vihanna ;
Ya, dre eur gwir gundu me 'vo skwer vad d'ar bed,
Ma fazi ma halon,ma dorn ne raio ket,
Rag kentoh he zreuzjen gand houarn pe gand dir,
Eged hiviziken ken mond a-eneb d'am ger⁹⁷.

Ar Mêr

Gwell a ze, rag, a-walh a spont hag a enkreuz,
A gañv hag a hlahar 'zo hirie er barrez ;
Ha ne vezo biken re a vadelezou,
Da gompezi kemend a haou hag a gollou.

Fantig

(nerzuz)

Me, laer evel Jord Foll, eun dra 'm-oa distaget
E talhan mad dezañ na pa vefen lazet :
Hogen me 'n em zishra deuz ma ostaleri,
A zalho en he leh gwestell, krampoueziri,
Ha pa'z oh den ken mad, Aotrou Mêr, ho pedan,
Da gemer diganen ar yalhad arhant-mañ
A rofot deuz ma ferz e-bazr en donezon,
Da vugale Laou-Vraz, 'oa ma brasa mignon.

Ar Mêr

(gand stad)

Krdit en em gargan deuz se gand kalz a stad,
Evite, me, Itron, deu d'ho trugarekaad :
Me 'roio kemend-all d'ar vugaligou kêz.
(O tiskwel bugale Yann gêz)
D'ar re-mañ 'roin ivez ; ne chomo den er-mêz.

Jozon

An traou ah a mad-tre ; n'o-deus 'med kenderhel,
Hag e welfom amañ burzudou 'vo ket pell :
Ar zent vrasa, ma zud, eo ar re a zistro,
Neb a ra evelte 'zo meulabl en peb bro,

⁹⁶ ingratiri : galleg ; Dianaoudegez.

⁹⁷ ger : gir, er skrid orin.

Kement a dreh e si hag a dorr e dechou,
A walh dre e gundu buan de behedou.
War ze ra deuy bremañ an oll dud a-feson
D'ober brezel paduz en peb leh d'ar boeson,
Pep hini e zever, eur wech 'vo diskaret,
An oll dud 'vel breudeur a deuy d'en em gared

Trede arvest

*Mennoz, distaol ha kaniri*⁹⁸

Kenta pennad

D'al lun d'abardaez, d'an 28 a viz Genver 1901

I

Fantig

(he-unan)

Euzi 'ran pa zoñjan en oll walleuriou spont
A hoarvez dre voeson e-bazr ar vro tro-ront ;
Hag ar pezh a zamm din kement ma housiañs,
Eo dre m'am-eus pouezet kement 'barz er valañs.
En eun dra on, siwaz, kirieg dre oberou ;
Red e vijen poulzet gand an droug-speredou.
Fañchon 'n em bistriet, Katell, 'n he zi devet,
Ar priedou ar Briz... Emaint oll er vered.

(Hag e ra sin ar groaz)

Ha se heb niveri ar gaou, an droug, ar wall,
A zo dre ma boeson c'hoarvezet e leh all,
Ma-unan gand Pipi eh om bet war an tre,
Entre daouarn Jord Foll da goll on zamm buhez ;
Ha Per ken buan all 'nije greet gwalleuriou :
An traou-ze on kabluze dre ma bern evachou,
Kont am-mo da renta da Varner braz ar bed,
O Doue ! bezit truez ! ma gwalhit, me ho ped,
En amzer da zoned me ray deuz ma gwella,
'Vid harz ober neb droug, na gaou deuz ma nesa ;
Bepred deuz evachou ne wasin neb den ;
Rag birviken takenn em zi ne roin ken :
Eh an da glask Jord Foll da rei skoaz da Bipi
Da zifrega dioustu ma hosa ostaleri.

(Hag eh a du Jozon)

II

(Pipi o tond gand eun tamoez, e vreh astennet war-lerh e wreg).

Ma'z-pije bet sentet e oa a-blad pell 'zo.

*(Diframma a ra ar bod-ilio*⁹⁹)

Ar bod-ilio d'an traoñ, hag ar gwer er bloto'.

(Karga 'ra aneze 'n e zamoez hag o has d'an ti).

⁹⁸ Mennoz, distaol : dizoh, tabut

⁹⁹ bod-ilio : ar pezh a oa merket a-uz d'an darvarn. Dond a ra da dalvezoud tavarn“.

III

*(Jord Foll 'n em gav war-lerh Fantig, eur morzol gantañ.
Pipi 'zo distro.)*

Jord

Bremañ 'rofen an dorn, a-greiz-kalon, Pipi,
Da zikour difrega kement ostaleri.

Pipi

Krog aze 'ta, neuze !... ha treo' ahan buan.
(Hag e krogont).

Fantig

('n eur vond en ti).

N'it ket d'en em zраста, n'ho-po kentoh¹⁰⁰ ho koan.

Pipi

(dioustu)

Bet e-poa eun amzer 'gaozees ket 'vel se.

Jord

('n eur labourad)

Ne gredan ket o cheñch e kavfe gwall gerse.
Evidon, ne 'ran ket.

Pipi

Me 'ra nebeutoh c'hoaz ;

Rag kentoh 'vid pemp bloaz 'oan ivez eun den poaz.

Jord

Goude ne evez ket deuz hini kreñv kammed.

Pipi

Hag al likuriou louz, ar re-ze gontont ket,
Koz lapad pistriet a stag deuz ar galon,
'Zo ker gwaz pe wasoh, kred mad se, ma mignon.

Jord

Kas am-eus oute oll : 'gemerin biken mann.

Pipi

An hini vad a ri... Kasom an treo'-mañ 'hann.
(Hag e kasont kuit an treo' dishreet).

Pipi

(o tond gand eur barr-ti nevez)

Deom bremañ d'ar barr-ti, barreg om, 'raog 'vo noz,
Da lakaad eun nevez e-leh an hini koz.

¹⁰⁰ kentoh : abretoh.

*(Distaga 'reont an hini koz : ostaleri hag en e leh an hini
nevez : krampoueziri ha pasteziou.)*

Jord

Greet an taol.

Pipi

(gand stad)

Mad-tre... Foar¹⁰¹ d'an ostaleri,
Gwestell, krampouez ha lêz, en ti Fantig-Pipi.
(Hag e c'hoarzont da vad).

IV

*(Kerkent dre an tu kleiz, ar Mêr 'n em gav gand Yann-Gêz,
gwisket mad, pleget e benn, Fantig en toull he dor).*

Pipi ha Jord

(en eur wez)

Nozvez vad, Aotrou Mêr.

Ar Mêr

Memez tra deoh ho-taou,
War a welan gand stad eh a gwall-vad an traou.
Deut on war-eeun gand Yann, 'gernerfot en ho ti,
Da hortoz ken a vo adsavet e hini.
Gweled a ran 'n-eus keun d'e amzer dremenet :
Skriva 'rin evitañ d'an Aotrou Sous-Préfet,
Me 'gred 'vo digollet e-barz en berr-amzer.
('n eur zaludi).
Keno, 'h an 'n eur dremen da wel'd ma mignon Per.
(Hag eh a kuit).

Pipi ha Jord

(kreñv war e lerh).

On bennoz, Aotrou Mêr, c'hwi 'zo deom oll êl-mad !

Fantig

(juntret he daouarn)

Ra viot benniget !

Yann

(sioul, astennet e zorn)

Trugarez, ha mennad¹⁰².

(Oll kuit).

¹⁰¹ foar : an diaoul.

¹⁰² mennad : anaoudegez vad.

Eil pennad

(D'ar zul, d'an deg a viz C'hwevrer 1901)

I

(Erwan ha Perin a deu deuz an tu dehou, hag eh eont da gorn stal Per)

Erwan

(krog en dorn Perin)

Emberr, ma harantez, e rankan ho kuitaad :
Kred eh an adarre gand kalz demeuz a stad !
Pa welan da dad ker ha ma amezeien,
O tond da zilezel an evachou a-grenn !...
O kimiadi ouzit, mar 'peus soñj, warlene,
'M-oa laret dit kemer esperañs ! nerz ha fe' !
N'em-oa ket soñjet fall : ar bed 'h a war wellaad !
Ha gwelloh 'yelo c'hoaz 'po peuryahaet d'az tad ;
Hag eur wech 'vin distro, er vrasa levenez !
Ni 'vo prest unanet dre ar briedelez !

Perin

Ma bras stad, Erwan, 'vo lakaad ma galloud,
Da blijoud da viken da eun den evelvoud !
(Kleved a reont trouz hag e chomont sioul).

II

(Per ha Mon a deu deuz o zi en eur hrozmolad)

Mon

(da Ber o tond)

Gwall abred eo dit, Per, dond c'hoaz war ar bale !

Per

(n eur vouse'hoarzin)

Moarvad ne chomin ket atao 'barz em gwele !
Me 'wel on teir zun 'zo dindan an niñselio' :
Ne chomin ket pelloh, grogno neb a garo !
Emaom hirie an deg demeuz a viz Genver,
Erwan a gle kuitaad ahanom 'barz emberr,
Ha c'hoant 'm-eus d'ober c'hoaz, gand e dad ha gantañ
Eun tamm kaozeadenn... Lar deze 'ta dond amañ !
(Mon 'h a da di Jozon).
Entre Jozon ha me moarvad 'vo tomm ar hod¹⁰³ !
Ha bremaig 'vo gwelet piou 'vo ar gwella pod :
N'eo ket a-walh lared : « ne evin biken mui ! »

¹⁰³ ar hod : an afer.

Red eo c'hoaz kaoud an tu da harz ar vezventi.

Erwan
(*a-drekañ*)

Ar wirionez ! med se 'vo diêz da ober !

Per
(*o tistrei*)

Adarre gand Perin !... Mezaon 'vi din mab-kaer !

Erwan
Ma brasa stad e ve !... Med erru e' ma zad :
Me 'lezo ahanoh ho-taou d'en em strapad.

III

(Jozon a erru gand Mon, stad ennañ ; Per o weled penn Pipi 'n e zor, a lar kreñv, 'n eur ober sin gand e vreh : « Tostait oll ! », ha Pipi ha Mon a yelo war o hiz hag a deuy prest goude gand Jord Foll ha Naig, Fantig ha Yann. Erwan a-gleiz, Jozon a-zehou en pep tu da Ber, hag ar re all a-dreg).

Per

Tostait oll ?

Jozon
(*en eur zaludi*).

Deiz madn Per ! gand plijadur ha stad !
Pa welan ahanout yah-pesk ha livet mad.

Per
Nebaon ! bet on gwasket o houl da aliou ;
Soñj 'mo deuz ma hleñved er rest deuz ma deziou !
A-greiz ma vijen yah 'hadkouezfen adarre !

Jozon
(*'droh e gomz*).
Ma ne evez ket ken n'e-po kollet morse¹⁰⁴ !

Per
Greet an taol ! biken ken, er heit 'm-eus da veva,
Deuz neb seurt boeson kreñv ne deuin da eva !
(*Dindan e zao*)¹⁰⁵
Ha ma ven rediet gand eur re da drinka,
'Kemerin dre eur red, vermout pe malaga.

Jozon

¹⁰⁴ morse : netra.

¹⁰⁵ dindan e zao : evitañ e-unan.

(gand mall)

Arabad e vo dit ! ! Taol evez ha diwall !
An evachou-z, oll ! a zo ker noazuz all !

Per

(souezet)

Penaoz ? ar gwineyer¹⁰⁶ : byrrh,mader, quinquina ?

Jozon

‘Zo poezon ! ma mignon ; na gemer ken netra !

Per

Penaoz ‘ta ‘rin neuze da drinka gand an dud ?
Rag n’hellin ket ‘vid se beva ‘vel eul loen mud.

Jozon

Gand lêz dous ! ha dour sklêr ! netra ken, ‘laran c’hoaz !
Bremañ ‘po da ziwall kalz muioh, pa out poaz.

Per

Trelatet out ‘velkent ! pa larez traou ‘vel se ;
Istri¹⁰⁷, ‘vidon a ev, a chom beo koulskoude !

Jozon

Ar re-ze, ma mignon, nan int ket bet gwasket,
Evdel ma’h om-ni bet gand an alkol daonet !
E vinim n’e’ ket c’hoaz gwriziennet ‘n o gwad,
A zo da zarn eur banne ‘hell memez ober vad,
El leh an dakadenn a gouez war on hini,
‘Ra ‘vel petrol war glaou ! ‘ra dezañ divuni !

Per

Kredi ‘walh a rafen : ‘velkent pa ‘mo sehed,
Ne hellin ket dalhmad trinka gand ar pesked ?

Jozon

Pa vi krog da zebri, ev gwin a-nebeudou,
A jistr gand hanter-zour en-kreiz ‘tre da brejou.

Per

Se n’e’ ket fall-daonet ! ha barreg on war ze ;
Med penaoz ‘n em gemer eur wech ‘vin gand eur re ?
Ne chomin ket atao em zi ‘vel Fañch ar Peul¹⁰⁸,
Deuz ma vo an doare a ranker mond da heul :
Pa drinko ar re all en-dro din, ken seder !
Daoust peseurt kendalh ‘mo neuze ‘n o heñver ?

¹⁰⁶ gwineyer =gwinou dreist.

¹⁰⁷ Istri : Reou all.

¹⁰⁸ Fañch ar Peul : beulke.

Jozon

E trinki c'haoz eur wech gand dour-jistr pe gand lêz,
Kalz a rank hen ober na gavont tamm diêz :
N'e' ket red kaoud boeson evid lared « yehed ! »
Na « lod ho krasou mad ! » pa vezer gand mignoned ;
Nan e' tamm talvouduz rankoud dond da drinka.

Per

(*gand nerz*)

Eno, krak ! koulskoude emañ an dalh starta :
Harz an ddu da eva na e' ket kalz a dra,
Ma vije ket ar hiz en peb leh da drinka ;
Ar hiz-se 'ta er-mêz ! da genta deuz eur penn ;
Rag en trinkerezou 'n hini 'mañ ar wrizienn,
War digarez trinka eo eh ever boeson,
Goude goud mad a-raog 'ra gaou en peb feson !
Hag eur wech greet ar pleg ne reer ket kalz a van
Ma teuer d'her haroud a-greiz, ola ! buan !...
Med an trinkerezou 'zo kreñvoh 'vid an den
Ha mezaon ar hiz-se ne gouezo biken ken !
Emañ er penn kenta en kement tra a reer,
Kerkoulz gand ar paourra 'vel gand eun impalaer !
Hag eun eskob memez n'hell ket mond da bourmen
Anez ober ivez enoriou d'ar werenn :
En yez Gall, c'hwi 'oar mad, e vez laret "toasti"¹⁰⁹ !
Da agodu unan 'ra ket, Jozon, me ho tisfi !...
Digarez 'n em weled, digarez 'n em dostaad,
Ober eun diazez, kaozeal war ar stad,
E teuer da drinka, da lared « yehed deh¹¹⁰ »,
Ha n'e' ket dour ha lêz 'lak ober se nebleh !

Jozon

Ma ! mar de' red trinka, gwech pe wech dre ar bed,
(Bete m'e' sod an dud !), trink, Per, ha na ev ket !
Trink ! o sao¹¹¹ da werenn ! ha klask eun digare'
Dond d'en em dizamma bep taol deuz da vanne !

Per

Êzetoh eo lared evid n'en de' ober,
Goude c'hoari 'vel-se ? mefe ket greet eun taol kaer (!)
Ha ma ne glaskez din eur stumm muioh gouizieg
Emañ war an tamm-ze pell Yann deuz e gazeg !...
N'eo ket a-walh, Jozon, lared na evin ket !
Mar doh barnet¹¹² d'ober 'benn kerzed dre ar bed ;
Rag daoust penaoz 've greet ma vez ket evet ken ?
Ha peseurt degemer e rafed deuz neb den :
N'oh nag evid merka eur vad greet deoh amañ.

¹⁰⁹ toasti : ?

¹¹⁰ deh : deoh.

¹¹¹ sao : sevel

¹¹² Mar doh barnet : mar deo red deoh.

Na diskwel d'eur mignon ar stad 'peus evitañ,
Anez kinnig dezañ, raktal m'en em weled,
Eur banne, seurt pe seurt, da drinka d'e yhed ?

Jozon

Pa'z 'to eur blijadur da ober d'eur mignon,
Na ginnig ket dezañ traou noazuz d'e galon !

Per

Ha ma ve ma mignon e-barz er zell kavet ?¹¹³

Jozon

Eur mezhvier nebeutoh az-po dizorhennet !

Per

Na kinnig ! na kemer ! na trinka gand neb den !
Neuze 'benn eur pennad 'mo mignon ebed ken.

Jozon

Er hontrol 'vad ! Per gêz ? neuze 'n hini 'po ken
Nemed gwir vignoned er heit ma'z peus da ren ;
Ar re 'reer der voeson n'int 'med kenseurtes fall
'Deus tamm talvoudegez en-kichenn ar re all :
Ma kollit ho yhed, ho tanvez, ho puhe',
'Benn kaved mignoned eo gwell tremen hepte.

Per

Ne dalv ket lared se ? red eo er penn kenta,
Ober 'vel ar re all, pe n'oh mad da netra.
'Hoarvez ket gand an den 'vel gand bleizi e vro !
Barn et eo 'n eur henel¹¹⁴ da heuill ar hizou 'zo ;
Ha tre ma kendalho 'giz an trinkerezo'
Eur wech c'hoaz, Jozon kêz (!), an dud en em vezvo.

Jozon

(dre zroug)

Nan eus den rediet da eva, pa laran.
Deuz traou louz ha noazuz e ran gaou deuz outañ :
Daoust ha peleh emañ an den fur ha gwirion
A daol gand gouiziegez binim war e galon.

Per

Peleh ? peleh ? dre oll ! koulz lared an oll dud.

Jozon

Ma ! neuze int sotoh evid al loened mud.

¹¹³ Ha ma ve ma mignon e-barz er zell kavet ? : ha ma n'eo ket a-du va mignon gand ar pezh a ginnigan dezañ ?

¹¹⁴ 'n eur henel : implij fall ar ger "genel", diouz ar galleg. "goude beza ganet"

Per

En feiz neuze keit int 'ta ! ha pa vo deut ar hiz
Da eva deuz dour hao¹¹⁵ ! refont oll heb diviz :
'Glasker 'med heuill ar hiz pa vez sod ha diroll.
An hini 'raio ket 'vo kazet gand an oll.
'Benn mond en touez an dud eo red rei ha kemer ;
Eva bete kreuvi ! pa chom e-barz er gêr.
Kemerit dous pe dreñk, ne dalv ket lared nann.
« Me, eme an ostiz, ne vevan ket gand mann. »
Ma lerit krenn 'po sort¹¹⁶ ! 'vo laret deoh gand mall,
Mond gand ho troad, pemoh, da gluda el leh all¹¹⁷.
Ar bed a-bez hirie 'zo dre voeson 'n e za' :
Ha nemed dre voeson ne reer warnañ netra :
Na n'oh ket gouest zoken da vond er-mêz ho ti
'Zo eur bern bannahou raktal dindan ho fri.
'Refot ket eur hammed neb leh ma vezoh dioustu
Galvet prest da drinka gand eur re, tu pe du.
An ostaleriou a zo a di da di,
Digarez dond dalhmad en hini pe hini :
Da dest gand eur gomer ! da zisklêia 'r maro,
Da zikour Yann ha Paol, bep tal vez bannaho'.
En interamañchou e vez savet arhant,
Gand an oll dougerien dagaved gwin-ardant.
It da gement servij, d'an oll deiz ar bloaziu¹¹⁸
Ne welit 'med tud vezo er pri war o genou.
Hag en tro 'pad ar bloaz, en pep koulz, en peb leh,
Oh barnet¹¹⁹ da lonka e-barz en desped deh¹²⁰ ;
It da lein eun eured, d'eur marhad, d'eur pardon,
D'eur gouel, d'eur vadeziant, da weled eur mignon,
Dre oll e vo boeson demeurez ar penn kenta
Hep komz deuz malarjez hag an deiz kenta 'r bloa'.

Jozon

Ar wirionez, siwaz ! a lavarez aze, Per :
Med ar hiz-se 'h ay kuit e-barz en berr amzer,
Pa deuy skiant d'an dud.

Per

Ne deuy biken, siwaz,
Ar hiz sod, er hontrol, ah ay war greski c'hoaz.
An oll 'glask dond en kêr da veva deuz ar stad,
'Vel e klask glazarded loagennou¹²¹ louz ar prad.
Labezet eo ar vro a osteliriou.
'Vel pa n'hellfem beva nemed dre vannahou :

¹¹⁵ hao : hañvez.

¹¹⁶ 'po sort : 'po netra.

¹¹⁷ Mond gand ho troad, pemoh, da gluda el leh all : notenn e galleg, en droidigez galleg : expression bretonne.

¹¹⁸ d'an oll deiz ar bloaziu : deiz-ha-bloaz.

¹¹⁹ Oh barnet : red eo deoh.

¹²⁰ deh : deoh.

¹²¹ loagennou : lehiou kaillareg.

Leh zo daou vouloñjer zo kant ostaliri,
O klask deuz o gwasa rei tu d'ar vezventi,
En disterra kroazhent, dre leh ma tremen tud,
'Zo ennañ eun ostiz oh ober e damm klud.
It el leh a gerfot e kaofet klotenno'.
'Uz dorjous ar re¹²² 'vrañsell ar bod-ilio.
Ha diaviz daonet e vefe ar paour-kêz,
Na baefe 'barz enne e leh 'barz ar gwarez.

Jozon

Tremen heb mond enne.

Per

Tremen heb mond enne !

Pe, neuze 'vad, Jozon, 'po da ziwall goude,
« Ma ne deuez d'am zi, me n'in ket da hini ».
« Ro din, ha me 'roy dit », evel-se 'mañ 'r c'hoari.
Neuze, an ostizien, kredit, 'vint ket skornet
Peurvuañ 'vez o fenn er prenester o selled ;
Pe war-hed, disimul, en toull o dorjojo',
Prest d'ober jiboudo¹²³ d'ar henta 'dremeno :
« Na deuit ket d'an ti', 'larfont da Yann ha Paol ;
Ha pa vefont e-barz, « azezit deuz taol »...
Ouspenn, an ostizez dezi eun tamm koantiri,
Pe ez eo eur vatez kalz koantoh eviti,
Rag , anez marteze, 'h afe ar stal da fall.
Me 'lar deoh eo diêz d'an oll en em ziwall.

Jozon

An ostaleriou 'zo heñvel-beo d'an den,
'Deuz ar gwiad-kevnid greet da dapoud kelien ;
An neb a ya enne e vo sunet e wad.
Dizehet evelte, abred pe ziwezad,
'Vel ar helien ivez, an dud n'int ket 'vid o zech,
Ma'h eont evelte d'en em goll 'barz ar pech.
Hag an ostizien, Per, a hounez deuz ar stad,
Tra ma chomo ar braz ahanom c'hoaz sod-mad.

Per

Neuze dit-te, Jozon, eo diod an oll dud,
Harpet int gand re vraz koulz ha gand re vunud ;
'N o dorn emañ ar voull¹²⁴, an oll a-du gante ;
Ar pennou braz a-bez a glask o harante',
Dreist-oll dre ma tosta koulz ar votadegou,
Rag nerz ar vot ivez a zo er bannahou.
'N'eus memez netra all kalz muioh pennabeg,
D'ar vezventi direiz evel pep votadeg ;

¹²² ar re : pere, er skrid orin.

¹²³ d'ober jiboudo : kañjoli.

¹²⁴ emañ ar voull : emañ pep tra.

Frikad e vez enne berniou arhant spontuz,
'Vid gounid mouez ar bobl er stumm muia mezuz.

Jozon

Memez tra a lerom ; sotich¹²⁵ ar poblou kêz,
'Zo kirieg ma n'a ket eur seurt giziou er-mêz.

Per

(dre zroug)

Hag e teufor biken a-benn deuz mezventi,
Ma vezer braz ha bihan o c'hweza warnezi.
Tra 'vo harpet ken stard gand ar re on gouarn,
Ne vo biken trehet gand dir na gand houarn,
Kazi an oll vêred 'ro tu ha nerz dezi,
El leh 'vo beh ha c'hao¹²⁶ ne vountont ket o fri.
Gand aon 'vo krennet d'e benn kenat votadeg,
Gand o gwir ostizien ha peb rouler penneg,
Er hontrol e klaskont sort digare',
'Vid ober plijadur da dud ken a zoare (!)
'Liesa 'ma vo gallet e vezo goulennet,
An digor hanternoz evid ar ganfarded,
Rag en noz, c'hwi 'oar mad, 'vez greet an taoliou kaer,
E teur êzetoh a-benn deuz Pipi-gouër¹²⁷.
Allaz, red eo lezel ar hoñvers mond en-dro,
Rei tu da bep hini d'ober gwas ma hallo :
« Paotred Mari-Robin¹²⁸ evid plijoud d'ar Mêr,
Eun tamm a-raog an eur en em denn sioul d'ar gêr ;
Eun ostiz 'vez war-hed, 'vel en ti ar brini,
Hag a gas ar helou buan da bep hini ;
Ha kloh an hailloned ne lar ket kalz a dra,
'Med lared d'an ostiz 'mañ e goulz da flemma.

Jozon

Se 'ziskwel sklêr om c'hoaz er vrasa dallentez
Pa ne greder lakaad eun harz d'ar fallentez ;
Med pa deuo prestig d'an oll poell ha skiant,
Dre stad an oll skoliou ha nerz an deskamant,
'Vo kaset da bourmen kement den difeson
A gaseo¹²⁹ on gounid gand korvajou boeson.
Kement hini, ouspenn, 'n em roy d'ar vezventi
A gollo war an tomm e zrejou¹³⁰ da voti.
Peogwir eun den mezo ne oar ket petra 'ra,
Ne gle ket rei e vouez da zisvarn¹³¹ dem netra.

Per

¹²⁵ sotich : sottoni.

¹²⁶ c'hao : gadal.

¹²⁷ Pipi-gouër : lesano ar gouërien.

¹²⁸ Paotred Mari-Robin : lesano ar jañdarmed.

¹²⁹ A gaseo : e-nije c'hoant

¹³⁰ e zrejou : ar gwir da voti.

¹³¹ da zisvarn : da lavared ar pezh a zoñj.

Aze bremañ, Jozon, e komzez deuz ma giz.
Setu ar pleg kenta a stignfom heb diviz :
Mouez ar mezhvier barnet !... mad biken da netra.
Nemed dond a rafe goude da 'n em reiza.
Med gwall diêz daonet e vo 'n em gaoud eno
Entre ma vefom dindan "paotred ar bod-ilio"¹³²
Biken ne asantfont dodn d'ober kemend-all.

Jozon

Rediet e vefont da bleaga gand ar fall :
O nerz hag o galloud a yelo buan kuit.

Per

B'aio ket ker buan evel ma soñjfe dit :
Ar varhadourien win a gresk bemdez-bemde',
O c'hoari hag o stourm an eil deuz egile ;
Bete sevel tier 'reont d'o ostizien
Ha bounta koz lapach¹³³ e-barz en pep klotenn ;
Nan oh ket gouest, zoken, da gaoud ti da feurmi
Ma ne larit derhel ennañ ostaleri.
Int a grog a-raokoh e-barz an oll doullou
Evid kaoud ostizien dindan o hrabanou.
Kerkent ha ma tigor eun toull distouv en kêr,
E sao beh ha kaskal¹³⁴ e-barz en pep sellier¹³⁵ ;
Droug-feurmet ker 'vo prest ! ha lakaet warnañ harz ;
Ostiz ranko beza an neb a yel' e-barz.
Ha goude 'n e' lonket an ostiz kêz e loa¹³⁶.
(Eet gwreg ha bugale d'an Havr d'he dislonka)
Da vond en e damm stal 'vo kavet pe c'hweh,
Prest d'ober eveltañ e-barz er memez leh.
Peleh e tinerzfont ?

Jozon

Seblant vad ! seblant vad !

Ha prestig e weli e kouezfont oll a-blad :
Erru er penn pella e tistroer dioustu,
Hag ahane 'teuer d'ar pevar lamm-daou-ru¹³⁷.
Ha ma chomez da ren e weli ar c'hoari.

Per

Pa 'h e' kreski, 'reont ! n'e' ket dineveri.
Me 'lar er hontrol 'vad ! ha c'hwi ivez 'welo,
Prestig ar bod-ilio « uz kement dor a vo ;
Rag ma kendalh an traou 'n eun heveleb doare,
E vefom oll ostizien eun deiz heb goud dare,

¹³² paotred ar bod-ilio : paotred an davarn.

¹³³ koz lapach : boeson fall.

¹³⁴ kaskal : c'hoantidigez.

¹³⁵ sellier : stal.

¹³⁶ 'n e' lonket an ostiz kêz e loa : troet ger evid ger deuz ar galleg.

¹³⁷ d'ar pevar lamm-daou-ru : d'ar pevar-lamm ; daou-ru ?

Memez 'n eur gêr vihan, n'emañ ket pell ahann,
'Zo c'hoant d'ober eun otel deuz chapel gêz Sant-Yann.
(C'hoarz)

Jozon

E farsal 'out bremañ ; birviken se hoarvezfe ;
Ar skiant, ar furnez 'h a war-gresk bemde' :
Skuiza 'rafer buan deuz gizioù ken diod.
Dre forz terri podou, 'n em gavo tomm ar yod¹³⁸,
Kaer 'vo bounta boeson en kement klotenn fall,
Ma ne vez ket evet e vo eur c'hoari all.

Per

Peleh n' vo ket evet, med beh a ve kenañ,
O klask gweled pere 'ev ar muia outañ :
Pennabeg e' da galz da ober o faotr-braz,
Goude vezer heug, ha leun, eh ever outañ c'hoaz.
Mar doh deg asamblez, pep hini 'ra e dro,
Dindan boan da veza den laosk ha divalo ;
Ma ra unan eun dro war gorre ar re all,
Pod-pri a yel' da heul 'benn beza didamall.
Tapet 'vezer 'n eur gwall bleg eur wech dirag an daol,
N'heller ket 'vel eur laer en em denn kuit a-doal ;
'Grefoh ket, gand ar vez, laret 'po mann ebed ;
Komzet 've war ho stad gand ar re all abred.
Mar doh klañv gand eur sort kemerit eur sort all,
Eun darn euz ar galloud da ober mad na fall.
Daoust da biou, ma Doue, 'rafe poan ar boeson
O-deuzs oll zent vrudet ar vro-mañ da baeron.
Sant Erwan, Sant Eflamm, Millon hag Anton.
Sant Rafael, Sant Jord, da hortoz Sant Brandon,
P'hini 've ket gwall fall en penn ar gwin-ardant¹³⁹,
Rag piou 've pouzset gand evaj mad eur zsant.
Ha bemdez 'h ijiner likuriou burzuduz,
A ziskuiz deuz re all, iskiz, ha yeheduz.
Er stumm-ze ar boeson, kaer ho pezo lared,
N'emañ ket war an tre de veza diskaret.

Jozon

Gand al lezenn nevez eh afer war an nan,
Pe gerray 'vo evet kalz nebeutoh outañ.

Per

(reud)

Ldezenn nevez, petar ? nan e' mad da foeltr sort¹⁴⁰,
Eben a o jilgamm, homañ 'zo luch ha tort,
Nan eus lakaet warnañ¹⁴¹ 'med eun tamm kresk hepken,

¹³⁸ Dre forz terri podou, 'n em gavo tomm ar yod : ?

¹³⁹ ar gwin-ardant : notenn gand an oberour 'Eteo an dizurz' (abeg an dizurz).

¹⁴⁰ nan e' mad da foeltr sort : ne dalv netar.

¹⁴¹ warnañ : war an alkol.

Kment a vo evet en eil tro 'vel 'n eben ;
War biou 'kouezo bahad ? atao war ar paour-kêz
A yel' diwar an tre er brasa dienez.

Jozon

N'heller ket mond re feulz, er bed-mañ, gand netra ;
Red eo derhel kompez ar budjet¹⁴² en e za'.

Per

Lez da zigarezou ha kaoze divurzud,
'Deus greet 'med ober goap adarre deuz an dud :
An oll valtouterien 'zo dalhet 'n o hargou,
Goude ma oa laret eh ejont d'ar blotou.
An traou a zo chomet evel ma oent a-raog,
Ha gwasoh 'vid biskoaz pep hini zach d'e grog.

Jozon

Se, Per gêz, 'oe atao hag a vo da viken !

Per

Hag ez e' talvezet trei al lezenn.
'Dalv ket kas karr ha marh 'barz en tu all d'an hent,
Ma kendalher bepred ker gwaz ha diagent.
Me 'gave din 'oa greet 'vid skei ar vezventi.
Ma, n'e' ket ar stumm-ze 'vo krennet dezi he fri,
Na pemp na c'hweh gwenneg war beb boutaillad traou
Ne harzo ar boeson da zerhel d'ober gaou ;
Bete ma oent e oent, 'oe deze skei dizamant,
Ugent real pe daou skoed peb litrad gwin-ardant.

Jozon

Neuze, Per,vije greet kalz gwaz evid pa vez.
Savet 'vije boser en kêr ha war ar mêz.
Dija 'vezer eet gwall-bell deuz giz meur a hini,
Friket ha diswintet¹⁴³ meur a ostaleri.
N'heller ket a-blen 'tond diskar 'vel eun taol horz.
'Kerz ar bed, 'nez lakaad ar bobl da hopal forz.
Mar lazit eun den tord 'benn dodn d'hen didorda,
Eo gwelloh her lezel toird hag all da veva.
Al lezenn nevez, Per, 'zo eur gentel hepken,
Roet gand gouiziegez da evesaad an den ;
Rag war zotaad bepred e ranko mond bremañ,
Ma ne fura foeltr tamm, kaer 'vo gwaska 'nezañ.

Per

'Zislaran mann war-ze ! med n'eo ket a-walh c'hoaz,
'Benn harz ar vezventi 'barz er vro-mañ, siwaz !
Ha ma ne stigner dezi eur pech all stumm-pe-stumm,

¹⁴² budjet : galleg.

¹⁴³ diswintet : dis + gwintet.

Ar stad a gendalho da ren a rumm da rumm.

Jozon

Kaer a vo, eur wech c'hoaz, dond da stigna pechou
'Vo ket harzet an den d'ober diotachou ;
Ha ma ne fura ket anezañ e-unan,
'Vo da viken gouestlet da'n anken ha d'ar boan.
Dit eo red heuill ar hiz ! hag ar hiz a zo fall !
Neuze kentoh a ze eo dem mond en eun all :
Degasom 'ta ar hiz da dremen heb eva !
Hag e-leh kaoud kerse, an oll a gavo da !
Med kaer a-mom prezeg, ne vo ket greet a van,
Ma ne ziskwelom ket ar skwer vad on-unan :
Dre skwer hag oberou eo e vez digoret
Spered ha daoulagad da boblou kêz ar bed

Per

Giziou nevez dre skwer, ne erruint biken.
Ma ne vez ket lakaet d'ar re goz eun harz krenn.

Jozon

Kaoud eun harz krenn, Per gêz ! d'ar hiziou sod, foll
Ne vo greet birviken, an dra-ze 'oar an oll :
Ar fall 'vez a-viskoaz kreñvoh evid ar mad.
Pep si treh d'ar furnez ! an dra-ze 'zo anad ;
Ha war digarez se e heuillom oll ar fall.
Birviken den gouizieg ne rafe kemend-all.
Rag daoust ma 'mañ an droug o ren war an douar
N'eus barnet den d'e heul nemed an hini 'gar.
Lezom ar re deus c'hoant da lampad er vouillenn.
'N em reizom on-unan ! setu ar wir reolenn.
Mar astennit an dorn d'an neb 'zo 'vond da goll,
Ma ne ree ket a va her lezit war e roll.
N'eus den en karg amañ deuz sotisou eun all,
Gwaz d'ar re en em blij en-kreiz o zehou fall.
Pa mom¹⁴⁴ greet on galloud 'eneb ar vezventi,
Laoskom reiz e gabestr gand pep hini.

Per

Rediet mad, siwaz, pa vezer 'vid ober well ;
Med ar stad er stumm-ze a bado 'hann da bell.

Jozon

(gand nerz)

Ha me 'lar ne ray ket, pe refem oll brezel,
D'an evachou noazuz war douar Breiz-Izel.
Ma rafe o dever an oll dud a skiant,
'Eneb ar vezventi ha pep seurt gwin-ardant
A-benn deg vloaz hepken 've gwelet neventi ;

¹⁴⁴ mom : on-devo.

Labour, ijin, furnez, e-leh ar vezventi.
An ostaleriou a ve rediet mad,
Evel dre eur burzud, da goueza a-blad.

Per

Evrusamant, Jozon, evid an ostizien,
An emgleo-ze 'trezom ne vo greet foeltr biken.
Med goude ma vefe, petra 'deuy da veza
Ar mil milerou tud 'zo oute o veva ?

Jozon

A ranko labourad, da genta deuz eur red,
Gand stad ha plijadur 'benn kaved o zamm boued.
Al labour d'an oll dud ez e' ar haerra tra,
Roet deze gand Doue amañ d'en em harpa.
Ha pa labourfom oll 'vo dre eun nerz dispar,
Greet eul liorz kaer-kaera a-bez deuz an Douar.
Hg e vefom warnañ en evurusted vraz
'Vel Adam hag Eva er baradoz kenta.

Per

Hag e rin-me petra ? da hortoz se da zond,
'Benn harz ar hoaperez na droug-komz war ma hont,
Rag sklêr, ma henseurted 'hoarzo deuz o gwasas,
Ouz ma gweled troet ker fur a-greiz-olla.

Jozon

Lezel an dud da zroug-komz war da stad,
D'ar re fur ha gwirion 'po greet an hini vad.
Hag e-po an enor da genta, war eun dro,
Da ziskwel ar gwir hent da oll dud kêz da vro ;
'Devo dit diwezatoh anaoudegez ha stad,
A-benn fin da zeiziou, karget a drui-gare',
'Vel eur madoberour e vi douget gante.

Per

('n eur hoarzin)

Dampred avad, Jozon, daoust ha te 'pefe c'hoant
D'ober, a-greiz-olla, deus Per ar Floh eur zant ?

Jozon

Gra 'vel a laran dit ! pa vi sant pe vi ket,
'Vi evruz gand da dud en tre 'vi war ar bed.
Kazoud an oll voeson ! toue stard war da le,
Ober dezañ brezel en tro-pad da vuhe'.

Per

(en dizesper)

Brezel d'ar gwin-ardant, ha d'an oll evachou.
Brezel d'ar vezventi ! d'an dud ha d'o giziou.

Koulz eo lared dioustu dond da ober brezel
D'ar glao, d'ar hurunou ! d'ar skorn ha d'an avel.
Hag e talv din petra ? ma ne ziveran mann,
Egaji¹⁴⁵ ki ha kaz ! fourgasi Job ha Yann.
Roit din 'ta neuze eun nerz pe eun harp mad,
Hag eh in kalz muioh kaloneg d'an argad.

Jozon

O houren hep tamm riskl e treher heb enor.
Eur seurt lore n'a ket deuz paotred an Arvor.

Per

Heb benveg koulskoude eo diêz enebi ;
Red eo dem kaoud unan ma meum c'hoant da drehi.

Erwan

Se ve netra, ma zud, ma 'nije merhed Breiz,
'Vel re an Amerik, kalon a-walh 'n o hreiz :
Ar re-mañ en o bro o-deus distaget krenn :
Diskar a-daoliou baz o stal d'an ostizien.
O niver 'gresk bemdez, ma trastont a-blen-font¹⁴⁶
Kement ostaleri a zo er vro tro-ront.
Memez bete New-York, brasa kêr 'zo er bed,
E teu prestig Karri¹⁴⁷ gand he bagad merhed :
Eno 'vad e kavfont berniou gwer da derri.

Per

(gand fae)

Merhed ! c'hoari dotu war gwer ostaleri.
Biken re ar vro-mañ ne raint kemend-all.
Kentoh en em vodfent evid dond d'o diwall.
Ne red ket eur seurt gwad 'barz en o gwazied :
Kalz aneze 'ev muioh 'vid ne ra ar wazed.
Eur bern, ne zoñjit ket, en em vezvez 'barz er gêr.
Ha darn all, heb goud deoh, a ev en kuz, dre laer.
'Bouezom ket war verhed da gas ar stad da fall,
Da ze ne dalvont mann ! red e' kaoud eun harz all !

Jozon

Ne welan 'med hini ar furnez hag ar mad,
Barreg-braz, pa laran, da vouga peb gwall-stad.

Per

Gand benveg ar furnez, en amzer om enni¹⁴⁸,
'Vo diêz erruoud ha gwall-stard ar c'hoari.
Med pa ne gavom ken, eo gwelloh 'vid netra :
Ar re¹⁴⁹ 'vo c'hoaz a-du ganem da vihanna.

¹⁴⁵ Egaji ; hegi.

¹⁴⁶ a-blen-font : penn da benn.

¹⁴⁷ Karri : Carrie.

¹⁴⁸ enni : gwregel eo "amzer" evid Rolland.

Jozon

Kement den a galon ! an oll dud a feson,
A wel sklêr an dismantr 'ra bemdez ar boeson :
Neb a gar ar furnez ! eru bern tud a skiant,
A ra dre ar bed-oll brezel d'ar gwin-ardant.
Pennsturier ha memproù ar gouarnamant 'zo
Kannadourien bro-Frañs ! barnerien fur pep Bro.
Ar skolêrien, dreist-oll, a gelenn en pep skol,
Bemdez or bugale war dismantr an alkol.
Kement den, en eur ger, 'zo gwirion war ar bed,
'Vez ganem a-eneb an evach milliget.

Per

(gand stad)

Neuze n'e' ket ker gwaz ! ha se 'lak ennon stad.
Ha ma halon, Jozon, a deu da zederraad
Ha n'em-eus ezomm ken 'med eun esperañs all
'Vid kredi om barreg da houren deuz ar fall :
Eul lezenn dre an hini¹⁵⁰, ma ne vem evitañ¹⁵¹,
'Lako ma henseurtes dodn muioh war o nañ,
O tond da greski priz an alkol eun tamm c'hoaz.

Jozon

Diêz 'vo ober se ! rag eun dorn 'vedfe gwaz.
Kalz a deu da gemer evel eur gwir louzou ;
Da zarn all e kreñva ar galon a-wechou ;
Hag eur bern benviou a lak da vond en-dro ;
N'heller ket 'vid tud vezo skei ket gwaz war ar Vro.

Per

Neuze kaer mom¹⁵² prezeg ne errufom biken !
Ma ne vez ket gwasket muioh on ostizien,
Ha ma ne haller ket ober gwelloh ingal,
Dem deuz ar gwin-ardant en eur stumm bennag all ?...
Eur gentel, a lerit, meum bet dre 'n em ziwall ;
Med ma n'e' c'hoaz a-walh, dialbennom¹⁵³ eun all.

Erwan

Ar wirionez 'lar Per ! 'benn harz ar vezventi
'Ve red c'hoaz hadgweled al lezenn 'om enni :
Gwelloh ingal 've greet ma vije bet dre oll
Ar Gouarnamant perhenn e-unan d'an alkol ;
Eñ da rei deuz outañ 'vel butun d'ar zoudard
E lod da bep hini, (ober se 'vo ket stard) :

¹⁴⁹ Ar re : Pere, er skrid orin.

¹⁵⁰ b'hini, er skrid orin.

¹⁵¹ evitañ : gwregel eo "lezenn"

¹⁵² mom : or-bo.

¹⁵³ dialbennom : aozom.

Da bep penntiegez e rofe izel-briz
Ar pezh 'deufe dezañ, lakom eur wech ar miz ;
N'eus ezomm 'med eun ti 'vid se en pep parrez,
Ti ar butun 've mad ; gwelit, n'eo ket dêz !...
Ra skoy war egile goude droajou spontuz !
Da beurdizorhenni an neb 'zo re hoantuz !
Er stumm ma tegouezfe da beb rouler penneg
Paea da beb ostiz e vanne deg gweneg !...
Ra daolo da heul se koz gwineier¹⁵⁴ d'an traoñ
Ha prest d'ar vdezventi a vezo greet he haoñ¹⁵⁵ !

Per

(gand nerz)

Aze 'vad 'mañ an taol ! ha te a gaoze ral !
Eno rankfer koueza 'benn ma'h ay mad ar stal !
An den 'zo ken diod ma vo red da beb bro,
Huali anezañ a-benn ma furraio ! !...
En-dro prim ! Perinig ? tap din ma haier braz !

(Perin, kuit)

Ma verkan kent kuitaad an tamm-ze warnañ c'hoaz

(Den ne lar ger. Ha Per a zalh)

Bremañ 'hellfom bale hag ober tro ar vro,
Rag red e vo embann ar helou tro-war-dro.

(Perin 'deu gand eur haier hag eur hreion).

Per

(krog enne, a verk)

Kement en em vezvo, meum laret da genta,
Ne hello na voti na sina war netra.
Goude da bep hini 'vo taillet kleñk e lod ;
Deg gweneg peb banne dre-oll 'vid an dud sod.
D'am zro, war ar marhad, me 'skriv ivez ma zoñj ;
Ma ne fura ket c'hoaz... da beurnêtaad e hroñj.
'Vo merket war e dal gand eun houarn ruz-tan,
'Vid ma anavezet, gwallet gand peb unan.
On oll Gannadourien 'tal ar gouarnamant,
'Zivenno an tri dra dirag ar Parlamant.

(N eur zerr e gaier)

Ma vo d'ar vezventi lakaet prim eun harz krenn.

'Vid ma vo evuruz an oll da virviken !

Jozon

Da hortoz grdeom oll pep hini e zever,
Evid ma 'n em gavo kentoh eur seurt amzer ;
Rag ni o labourqad pep hini deuz e du,
O rei d'ar bed skwer-vad, dre furnez ha kundu,
Eo e lakaio se da zond hebdale pell,
'Vid enor bro gaer Frañs, hag hini Breiz-Izel.

¹⁵⁴ gwineier : gwiniou.

¹⁵⁵ he haoñ : he hañv.

Per

(gand nerz)

Hag e refom, Jozon ! me yel' dre an hent enk,
Biken ken ne evin nag hini dous na treñk :
Me 'dou kaoud 'vite oll ar vrasa kasoni,
'Oueze kalon eun den maga 'vid loustoni.
Evelдох 'rin brezel d'ar boeson milliget,
En pep stumm, en peb leh, etre 'vin war ar bed.
Dre oll, ha nerz kalon, ha dispont dibouez-penn,
D'ar vezventi d'he zro me 'gano kanaouenn :
Kanom 'ta, me ho ped, 'eneb ar vezventi,
A beb eil kent kuitaad, peb a damm son on-zri.

Erwan

Me 'gano tri goublad war don ar Marseillaise.

Per

Ha me 'gano pevarz wardon ar "bara-lêz".

Jozon

Me ivez diwar lerh a gano pemp pe hweh,
War don skiltruz "Yann goz", kent mond diwar al leh.

Per

Mad-tre, ma mignoned ; ha da beurechui,
E kanfom en eur wez gwitibunan on-zri,
Eur zoniou berr-berr-berr, war don ar "pillaouer",
'Ziskano a bouez-penn an oll 'raog mond d'ar gêr.

III

**(Er heit-se, ar Mêr ha daou pe dri all a deu war al lez hag
a chom sioul d zelaou ar ganiri).**

Erwan

(a gan)

I

Paotred stard Breiz, savit ho pennou,
Sellit ha gwelit en-dro deoh,
An droug, ar gwall, hag an dizurziou
'Lak ar vezventi en peb leh : *(diou wech)*
O ! Breiziz ker, na pegen euzuz
Da eur ouenn ar seurt d'on hini
Rankoud plega d'ar vezventi,
'Gouezfom ket c'hoaz dre eur stumm ker mezuz.

Diskan

(oll en eur wez)

Oll war-zao, paotred Vreiz, Poellder, nerz ha kalon
Brezel, brezel, en peb feson,
Da viken d'ar boeson.

II

D'an traoñ, ar gwin-ardant milliget,
Evach louz an droug-sperejou.
Kazom oll ar butun pistriet,
'Zo kirieg d'an oll walleuriou. (*diou wech*).
Ra vo flastret eru seurt loustoni,
En Breiz gand an oll da viken,
Ha mez, d'ar re 'glask hen divenn,
Ma vo trohet fe flemm d'ar vezventi.

Oll a-bez

War zao, a-bez, paotred, en kêr ha war ar mêz,
Trinkom, trinkom, gand jistr ha lêz,
Evachou louz er-mêz.

III

Oll war evez, ha gwaz d'an hini,
En em vezvo birviken ken.
Kreñchom oll warnañ gand kasoni.
Foei, d'an den hudur, laosk ha ven. (*diou wech*)
Red eo dem savetaad Breiz-Izel,
Prim deuz eur gouli ker mezuz.
Ma vefom goude oll evuruz,
Da ziskana 'n eur vouez skiltr hag uhel.

A-bez

Enor da baotred Vreiz, 'deus trohet an alkohol,
Enor, enor, ha gloar deze oll,
Breiz n'ay biken da goll.

Per

(*a gan*)

I

Ar vezventi 'zo mezuz ! ha noazuz da beb den.
An neb en em ro dezi 'zo den laosk ha den ven.
N'n-eus nag enor na kalon, karantez 'vid netra :
Euzuz eo gwall vuhez 'deu da heul pad ar bloa'.

II

Arao ! mez ! ha dismegañs ! da viken war ar bed.
Da gement den en em ro d'ar boeson milliget.
Ha malloz ! d'an tad digar a laosk er baourente',
Dre e vuhez dizingal pried ha bugale.

III

Arao ! war an ostizien ‘ro bodenn en o zi,
D’ar roulerien didalvez, tadou ha mammou kri’.
Dispriz vraz ha dismegañs ! d’ar varhadourien win,
‘Hoanta lakad der voeson ar bed war an tu gin.

IV

Ra deuio en berr-amzer an oll dud a skiant,
D’ober brezel didruez, dre oll d’ar gwin-ardant.
Ra vo mahet an alkohol ! trehet ar vezventi.
Ma vo an oll evuruz goude ze en pep ti.

Jozon *(a gan)*

I

‘Gredan ket ‘ve pliojadur, na kaerroh stad ar bed
Eged hini an den fur na ev takenn ebed :
Diskarg ‘vez korv ha kalon ha yah diwar an dour,
Ma krog c’hoanteg ha laouen e-barz en peb labour.

II

Joiusted ar vzventi ne ra nemed termen
‘Leh evrusted an den fur a bado da viken.
Unan ‘tro-pad e vuhez n’eus ‘med poan ha glahar.
Egile ‘med levenez ! tre vo war an douar.

III

D’an drougoberiou noazuz eo techet ar mezhvier ;
An den a boell ‘zo troet d’ober labouriou kaer.
Ar henta ‘ra ‘med maga dizurz ha kasoni ;
An eil had en-dro dezañ, karantez ! peoh ! dudi !

IV

Ar mezhvier d’ar reverzi ‘zo kirieg noz ha de’,
Egile ‘zalh ‘n eur wir stad pried ha bugale.
Pa vez spered ar mezhvier krignet gand an anken,
Hini an den mad ha fur ‘vez evruz ha laouen.

V

Ar mezhvier ven ha direiz, didalvez ha diroll,
A vo da viken kazet, disprizet gand an oll.
‘Leh ar poanier kaloneg a zalh war an hent mad,
‘Vo meulet hag enoret, degemeret gand stad.

VI

Kenvroiz ker, me ho ped, dilezit ar boeson,
Trehit ho techou mezuz, bezit tud a feson.
Heuillit hent kaer ar furnez, troit diwar ar fall,
Hag e vezoh douget amañ, kurunet er bed all.

A-bez, en eur wez

Diskan

Foei, foei foei war beb landruillenn¹⁵⁶,
Mez, d'ar mezhvier frik e bae.
Arao ! waranañ da virviken.
Kreñchom oll outañ gand fae.

O-zri asamblez

I

Sellit deuz kement landruillenn,
A vez mezo-dall war ar ru : (*diou wech*)
Peurvuiañ 'n e bern skodenn,
E dud hag eñ er gêr paour-du.

II

Sellit deuz pep tieg entre¹⁵⁷,
'Vez dalhamd o sklandenni¹⁵⁸ : (*diou wech*)
Mond a rank gwreg ha bugale
Da beurdizañ d'an Nomañdi.

III

Sellit deuz an den pinvidig,
En em ro d'ar vezventi : (*diou wech*)
Tud hag all o koueza prestig
En park Yann-Druillenn¹⁵⁹ da beuri.

IV

Ya, tud kêz, kement didalvez
A lonk boeson 'pad ar bloa', (*diou wech*)
'Rank mond da frita paourentez,
Ha gwerza kig¹⁶⁰ da gaoud bara.

V

Pep koz mezhvier a zo barnet,
Pa 'n-ez peurlipet e loa, (*diou wech*)
Da gaoud poan gorr ha poan spered,
Mez, da viken, dre leh ma'h a.

VI

Dre ze lezit an evachou,
Nahit ar boeson a-grenn.
Hag e-leh kana malloziou,
Gand stad ni gano evel-henn :
Enor d'an oll dud a feson,

¹⁵⁶ landruillenn : haillon.

¹⁵⁷ entre ; en e êz.

¹⁵⁸ sklandenni : o c'hoari bos.

¹⁵⁹ Yann-Druillenn :lesano eur paour-kêz treu.

¹⁶⁰ Ha gwerza kig : ha gwerza e grohenn (galleg).

‘Deus trehet ar vezventi ;
D’ar re ‘ra brezel d’ar boeson,
Gloar, enor ha meulodi.
(*diou wech*)

Ar Mêr
(**Seder**)

Ma halon ‘zo, tud ker, leun a lorch hag a stad.
Pa welan ahanoh ken troet war ar mad,
(*‘N eur astenn e zorn*)
Ha me ro ma bennoz d’an eil ha d’egile.
Eun dezi ‘vezoh digollet demeuz a gement-se.
(*E zell a bar war Berin, hag e lar*)
Med eun devez ken kaer ! ne vo ket echu mad,
Ma ne gan Perinig eru zonig kent kuitaad.
(*Hi a bleg he fenn*)

Jozon

Ya ! kan ‘ta ! perinig, da beur-beruechui.

An oll en eur wez

Ya ! ya ! kan !

Perin
(*d’ar Mêr*)

Evidoh !

Per
(*e zorn war he skoaz*)

Deus ! ma merh ; laosk warni¹⁶¹ !

Perin
(*a gan*)

I

Pa larit din kana eun tamm son,
M’her graio deuz a-greiz ma halon !
En enro d’ar re ro nerz bendez,
D’ar mad ! d’an urz ha d’ar wirionez.

II

Bennoz ! Aotrou Mêr ! Jozon, Erwan !
Ha bennoz deoh oll gwitibunan !
Ya ! bennoz d’an oll dud a galon !
‘Lak ar bed dond war an hent gwirion !

III

Ma halonig a zo leun a stad !

¹⁶¹ laosk warni : kan ‘ta !

Pa welan ma zad war an hent mad :
Selaouet 'n-eus Doue ma fedenn ;
Roet 'n-eus dezañ an absolvenn !

IV

Enor ! ha meuleudi a ganan !
Da gement hini a zo amañ :
Ra vefont d'an oll eur skwer dispar !
Ma reno ar peoh war an douar !

V

P'eo trehet ar vezventi noazuz,
Ni 'vevo bremañ oll evuruz !!
'N eur labourad laouen bemde' !
Kana meuleudi da Zoue !!!
(Strakadeg daouarn. Hag e pok d'he zad)

Gwerliskin, d'an deg a viz C'hwevrer 1901
Ch. Rolland

D'an neb a dreh e vezventi
Gloar hag enor ha meuleudi.

